

skol an emsav

KUDENN

AR

VROAD

3 LUR

niv.15

MIZ EVEN 1975

TAOLENN

=====

- p. 5 Pennad digeriñ gant Fañch Kerraen
- p. 8 An den, e vro hag e vroad gant Fañch Kerraen
- p. 14 Mojenn ar Vroad gant Ivon Gag
- p. 26 Notennoù diwar-benn Istor Breizh gant J. Chardronnet
- p. 29 Broad hag Istor gant Bernez Rouz
- p. 34 A-belec'h e teu ar menozioù reizh gant Mao-Ze-Dong

- P E N N A D D I G E R I N -

=====

Darn eus al lennerien a vo gwell souezhet marteze o welout ez eus bet kinniget gant SAE un niverenn a-bezh a-zivout ar vroad. Daoust hag n'hon eus ket afer amañ ouzh maendiazez hor freder hag hon ober politikel ? Penaos neuze e c'hellfe ar re o deus embannet ken uhel o feiz broadel lakaat en arvar o c'hredenn bolitikel ha tremen eus an diougan d'an aterz ?

Reizh eo koulskoude e teufe prantad ar burutellerezh goude hini an dogmategezh. En Istor ar brederouriezh e verzer an dra-se abaoe an trivec'hvet kantved ha n'anavezer talvoud ebet a gement ne vefe ket bet arsellet re nagennet (trabedoniez, buhezegezh, kravez hag all) abaoe Kant hag e ziskibien.

Setu ar pezh a c'hoarvez ivez gant mennoz ar vroad. Dreist-holl d'ar mare-mañ.

Da gentañ evit abegoù damkanel :

En e levr anvet Negative Dialektik e tistag ar prederour alaman Adorno al lavarenn-mañ a gavan leun a ster : "Alle Kultur nach Auschwitz ist Mülle" da laret eo lastez. Goude ar Brezel-bed diwezhañ hag diskiantegezh al lazhadegoù bras, ar c'hampoù-bac'h hag ar vombezenn atomek, souezh ebet e vefe diskaret ar feiz e talvoudegezh ar broadoù. Auschwitz, Hiroshima, peadra da ziskrediñ war wirionded ar vroadelouriezh, dreist-holl ma ne daoler ket evezh ouzh amsteriegezh ar ger broad ha ma kemmesker arc'hadur ur vroadelezh suj gant kelenadurezh imparaelour ar Stadoù. Ouzhpenn e ranker derc'hel kont eus levezon ar varksourion reizhkredennel o deus graet ur vurutelladenn griz eus mennoz ar vroad. Ideologiezh nemetken, ur fals-meizad, touellus ha faltaziel, setu petra eo evito ar mennoz-se, mat nemetken da zihenchañ ar speredoù ha d'o distreiñ eus ar stourm nemetañ a zo da gas da benn : stourm ar rênkadoù.

D'an eil evit abegoù pleustrek :

Anat eo o deus ar strolladoù politikel ha sevenadurel breizhat gwall ziaesterioù d'ar mare-mañ. Ha ne ziverfe ket o c'hleñved diouzh an ideologiezh a ren o ober politikel ? SAE a zo broadelour, SAE n'he deus ket graet berzh abaoe ul lajad, rak-se e tleomp lakaat diefedusted ar strollad-se war gont ar vroadelouriezh. Bewech ma'z'eus an anadenn B, ez eo diaraoget gant an anadenn A, rak-se A a zo penn-kaos da B.... Ar pezh n'en deus ket kalz a dra da welout gant mennozioù diamzeret ar paour kaez Aristotelez !

Ha graet hon eus ur gammed war-raok gant seurt prederiadennoù ? Ha ne vefer ket o taskiriat sonjoù kleuz pe zikle-zonoù hon araogourion ? Tud'zo a laro moarvat emamp o fankigellañ er memes dour-sac'h. Ne gredan ket. Evit muzuliañ an hent bet ergerzhet ganimp, n'eus nemet merzout eus pelec'h ez omp loc'het kuit ha peseurt skeudennadur eus ar vroad a oa sanket e pennoù hor c'hefredourion betek-hen. Div weledigezh a rene : ar pezh a anvfen ar vroadelouriezh hengounel, hag an eneberezh marksel.

a) ar vroadelouriezh hengounel.

Ur weledigezh diasavel (statique) eus ar vroad, termenet evel ur gevredigezh denel lec'hiet war un dachennad douar, ha diforc'h diouzh hec'h amezeien dre ar yezh, an doareoù-bevañ, an istor hag all. Honnezh eo tezenn ar brederourion Alaman evel Herder, Fichte, Arndt a gemer ar vroad evit un dra peurbadel, a chomfe digemmus a-hed ar c'hantvedoù daoust d'an daskemmadurioù a en em ziskouez war c'horre a-heul darvoudoù an Istor... un tamm evel donderioù ar mor a chom difiñv dindan lusk-dilusk ar gwagennoù. Ur wirvoudenn ken stabil hag ur c'heal platonat, ma c'heller en em skorañ war barnverkoù ergorel evit hec'h anavezout.

b) An dezenn varksel a nac'h degemer ar vroad evel un talvoud, o vezañ ma'z eo bet krouet ar broadoù gant ar vourc'hizelezh evit difenn o interestoù da vare ar c'hresk armerzhel. N'eo evito nemet un us-framm diazezet war ar mod-kenderc'hañ kevalaour, un ijinadenn brizius evit derc'hel ar broleterion dindan gazel ge ha mirout ar galloud politikel hag armerzhel.

D'ar re gentañ e respontin penaos ne gredan ket er bed meizel distag diouzh darvoudennoù ar bed-mañ. Sonjal a ra din ez eo tonket ar broadoù, evel pep tra bevnet ha dibad, da vezañ rasket diwar gartenn ar bed ma asant ar pobloù e vefent sujet, henvelekaet, diberc'hennet eus o zeñzorioù sevenadurel ha diframmet eus an douaroù ma'z int plantet enno. Heñvel eo planedenn ar broadoù ouzh hini an den : evel ma'z int bet ganet un deiz, ha m'o deus bleuniet un deiz, e c'hellont ivez mont war an diskar ha mervel. En ur ger, ouzh ur meizadur diasavel e ran-ker erlec'hiañ ur meizadur nerzhoniel eus emdroadur ar pobloù.

Evit respont d'an eilvet rummad, e rin dave d'al levr a zo bet embannet nevez'zo gant ti-mouladur Maspero : "Les Marxismes et la question Nationale". Darvoudoù pennañ an amzer avremañ : emsavidigezh an Trede-Bed hag an dizemglev etre Bro Sina ha Bro Rusia a zalc'ho da vezañ kevrinoù ha rouestladennoù digomprenus e-keit ma ne vezint displeget nemet dre ar meizad a stourm a renkadoù. Lakaet o deus ar varksourien en o soñj e oa ganet ar vroad gant ar Gevalaouriezh hag e oa tonket da vervel ganti... Hag e tarzher C'hornog dispac'hioù Budapest, Prag,... Hag e tarzher an Trede-Bed ar brezelioù a zieubidigezh vroadel : Ar Vietnam, Bro-Aljeria, ar Biafra, ar Gurded, ar Balestiniaded...

An hiniennegezh vroadel, tanav evel ur boultrenn o tont eus ar Ragistor, diboell ha trivliadel, diskiantegezh an Istor, hag a vir ouzh ar mekanik daelerezhel da vont en-dro (1).

Araok klozañ e rankan lavarout em eus keuz bras n'eus ket bet savet daou bennad ouzhpenn : unan diwar-benn diwanidigezh an emskiant broadel e Istor Breizh, unan all a-zivout an darvoudoù a c'hoarvez e Breizh d'ar mare-mañ, -evel e m'hen deus graet Yann-Ber an Dantec en e levr "Renaissance du Peuple Breton"- o lakaat splann a-wel an nerzhioù-dispenn hag o reiñ o ster d'ar stourmadegoù kevredigezhel a vremañ ha d'an dihun sevenadurel. Hogen spi am eus e vo kendalc'het gant an ervenn a zo bet boulc'het ganti.

Notenn (1) : Menegiñ a ran Levr Memmi "Juifs et Arabes" (dastumadenn Idées) CH. V Pl96-206 e-lec'h ma rebech ouzh ar strolladoù politikel marksour o dallentez-spered dirak anadenn ar vroadelouriezh ha ma klask adtalvoudekaat an devoud broadel en ur zegas tri abeg :

- a) dre ma'z eo ar gwaskerezh broadel ur gwaskerezh gwirion. Liesdoare eo ar gwaskerezh, seurt gwaskerezh a zo unan anezho, an hini a denn d'ar gevredigezh a-bezh.
- b) dre ma'z eo alies gwech an dieubidigezh broadel ampleg an dieubidigezh kevredigezhel (emzalc'h Mao).
- c) dre ma'z eo ur fed positifel, un ensav kevredigezhel gwirion un hantererezh ret etre ar renkad hag an denelezh, daoust ma ne zle ket ar stourm broadel bezañ disrannet diouzh ar stourm kevredigezhel.

F.Kerrain.

+++++

gant Frañsez Kerraen.

Ur vroad a zo ur bobl diazezet, korf ha youl, war ur vro. Tud 'zo a glever o lavaroud ez eo bet krouet ar vroad hag ar spe-red-bro gant ar vourc'hizien e vid tremen lost al louarn dre c'henou tud ar bobl hag o lakaad da giañ war al labour evito, da aloubiñ evito douaroù ha madoù pobloù-all. Ha pa weler doare-ober ar vourc'hizien, setu sur mad, brasañ c'hoant ar re-mañ ! E-barzh Istor Lanuon bet embannet nevez 'zo e c'heller lenn da skwer e oa bet kaset gant pennoù-bras ar vro evid difenn "ano glorijs ar vroad"... 50 mevel, al listenn anezho bet savet gant ar maer hag ar person... Hag ar re a fellas dezho enebiñ pe kounnariñ, gwazh a se evito : kondaonet e voent d'ar maro. Ar vourc'hizien ne farsent ket gant an traoù sakr evel ar berc'hentiezh prevez pe difennidigezh ar Republik.

Hogen un dra a c'hell bezañ ijinet gant ar vourc'hizien, ha bezañ un dra vad evêlkent : an ijinerezh da skwer (nemed e zo-areoù nac'hus). Hag a-hend-all, e-leizh a draoù a zo kouezhet e-tre daouarn ar vourc'hizien hag a oa traoù mad, hag a zo da zi-frammañ diganto : an douar-labour, an oberoù-kaer, ar c'henwerzh ar skol hag all...

Lavaroud ez eo ar vroad un ijinadenn vourc'hiz, n'eo eta diskoulm ebed d'ar gudenn. Ar goulennoù a zo d'ober eo ar re-mañ :

1) daoust hag ur menoz eo ar Vroad hag a vefe stag kalon an den outañ, ha nerzh-buhez d'ar bobl e-unañ ?

2) daoust penaos resteurel d'ar Bobl he bro ?

Ar vroad eo an dud a zo eus ur vro. Er yezhoù latineg e lavaront strishoc'h : NATIO a re a zo ganet er vro. Dante en XIII vet kantved a laka da dalbenn d'e levr "Florentini natione, non moribus", Florenzad dre e c'hinivelezh, n'eo ket dre e zoare-bevañ. Er skolioù-meur e veze renket ar studierien hervez "bro e c'havell". E Pariz : nation bretonne nation picarde...

Petra eo ar Vro evid an Den ? N'eus nemed an Istor a c'hellfe deskiñ dimp. Kemeromp daou skwer disheñvel-krenn : ar Yusevien, stag ouzh Palestina ; ar Vandaled, ha n'o doa bro ebed.

Teir lodenn a zo en Istor ar Yuzevion :

- 1) da gentañ, gant Moïzez, e kuitaont bro-Ejipt hag e savont ur vro dezho o-unañ.
- 2) d'an eil, e vevont enni, en-dro d'un Templ ha d'ul levr. Ha pa vezont en harlu ne sonjont nemed enni "Penaos e c'hellfen-me kanañ p'emaon pell diouzh Yerusalem ?"
- 3) d'an trede, stlabezet dre ar bed e-pad 2 000 vloaz, ne hunvreont nemed en o Douar Santel.

Adsevel a reont o yezh, miroud a reont o levr. Ha dre al lerc'h, ar grizder, ar brezel kaled hag al labour start, e adsavont o bro.

Ma n'o dije ket bet ur vro, ma ne vijent ket bet ur Vroad, daoust pelec'h o dije kavet kalonegezh hag ijin hag ere etrezo evid chom ur Bobl ? N'eus nemed gweloud ar pobloù ha n'o deus graet nemed redeg dre an douar. Pelec'h emañ ar Vandaled ? Aet int da netra. Hag e-keit ma raent o reuz, edo Breizhiz o sevel ur Vreizh nevez war un douar nevez, ar Saozon o sevel ur vro Saoz nevez... An Normaned e Breizh n'o deus diazezet netra ; ar re a oa war ar Seine o deus diazezet ur vro nevez.

Perag eta e ro e Vro nerzh d'an den ? Dre ma'z'eo dezhañ, dre ma ere an den ouzh e genvroiz (evel ma ra yezh, religion, kultur, kenlabour...). Reizh eo en defe pep hini e lod anezhi ; n'eus da damall nemed ar re a gemer ul lodenn re vras diwar goust ar re all.

Peogwir eo red ober ur sell war an Istor, greomp eta ur sell war Vroad Breizh.

Adaleg an amzer gentañ, pa oant c'hoazh diavaezourien o tont d'an douar-bras, daoust dezho dont eus un drevadenn roman all, e vezent anvet "Britones", ha sellet evel disheñvel diouzh ar Romaned (a oa, evid gwir, gall-romaned) ; ha disheñvel e oant : o iliz a or renet gant abaded e-lec'h boud renet gant eskibien ; o renerien a gomze brezhoneg evel tud o fobl, e-lec'h komz latin, evel ma rae ar berc'henned vras romanekaet a oa oc'h ober o mistri war ar "sklavourien" c'halianeg.

Hogen un amzer a zeuas prim a-walc'h ma voe anvet ivez "Brittania" an dachennad m'edo ar "Britones" enni, daoust m'o doa savet rouantelezhioù bihan, ha n'eo ket ur rouantelezh unvan. Ur wech ouzhpenn, setu ur bobl diazezet war ur Vro ; setu ur Boblad. Ha mar bije bet mor tro-war-dro, e vije bet sklaeroc'h c'hoazh, evel ar mor etre Breizh-Veur hag Iwerzhon, ar mor etre Bro-C'hall hag Aljeria. N'eo ket fall e vefe doareoù ar vro o harpañ doareoù an dud.

Gwir eo ez eus bet mareadoù-amzer hag o deus bet dam-ankouaet Breizhiz o doa ur vro. N'eo ket bet ar re-se mareadoù gwellañ eus Istor hor pobl rag "peb rouantelezh disrannet diouti hec'h-unan, a yelo da goll".

Breizhiz n'o doa ket ankouaet o doa ur Vreizh hag a oa dezho, e-pad reuz an Normaned. Med e maread ar feodaliezh e voe lakaet, dre holl, an "aotrou" dreist ar vro. Neuze e c'hellas lodennoù eus ar vro bezañ d'un "aotrou" norman, saoz pe c'hall (evel ma oa lod eus Bro-C'hall da roue Bro-Saoz). Evid mont d'ar Skol-Veur e veze red mont da Bariz. Daou "benn" ar Bed Kristen, ar Pab hag an Impalaer, a rae brezel an eil d'egile, e-lec'h difenn ar re zinerzh ouzh an alouberien lorc'hus. Ar brezelioù a oa brezelioù herezh.

Ne oa silvidigezh ebed, pa oa ar menozioù evel m'edont, nemed e klotfe beli an Aotrou ha tachennad ar Vro. E-pad brezel Herezh-Breizh, ar re a glaskas lakaad peoc'h en ur zaou-hanteriñ ar Vro (ar C'hreitez da unan, an Hanternoz d'egile), ne gomprenent ket e oa Breizh ur Vro, ha ne oa esperañs a beoc'h nemed gant ur gouarnamant hepken. Ha ragtal pa voe savet ar gouarnamant-se setu Breizhiz, lorc'h enne, birvidigezh, intrudu, ijin, oc'h ober gant o bro "ur gwir varadoz an douar" (ragskrid ar C'hatelikon).

Hogen pa lakeas Breizhiz ar relijion dreist ar vro (brezel ar re Unanet : ar relijion n'he deus ket da vezañ dreist ar vro, hogen ur goell er Bobl) ; pe ar menozioù politikel dreist ar vro (an Dispac'h gall : ar pezh a zo gwir eus ar relijion a zo gwir ivez eus ar menozioù politikel) ; pe roue Bro-C'hall dreist ar vro (an noblañsoù a yae d'e lez hag a veve diwar e c'hrasoù) ; pe vad e godell dreist ar vro (ar vourc'hizien). Ar re-se holl o deus nac'het war un dro o Bro hag o Fobl.

Er bed a-vremañ, bed an arc'hant, ar vourc'hizion eo o deus rastellet ar Vro (peb tra enni : politikerezh, skol, ekonomiezh hag all) evid o mad o-unan. N'o deus ket kuzhet petra a raent : adaleg 1789, ne oa nemeto hag a oa "Patrioted", int a oa an "Nasion", int a gase ar re baour d'ar brezel hag a zibenne ar re a glaske chom er gêr, int a ziskenne ar c'hleier eus tour ar barrez hag a skrape ar gwerc'hizi arc'hant en iliz ar barrez. Int-i eo o deus serret ar skolioù beteg an deiz m'en deus savet ar bourc'hiz-meur Guizot skolioù evid stummañ mevelien ha mitizien d'ar vourc'hizien ha diskar ar sevenadur-pobl hag enor tud ar bobl. Int-i o deus krouet an ijinerezh en doare ma plije dezho. Int-i eo a ren kelaouennoù ha skinwel, gwech evid breinañ ha di-youlañ, gwech evid dallañ ha dihenchañ.

Ur fazi bras avad eo ober fae war ar Vroad war zigarez he deus mistri fallakr ! E klaskfe ar vourc'hizien divroañ an dud ha krouiñ "mobilité de la main d'oeuvre" (kas-degas an dud a labour) a zo aes da gompren. Med pa glever ur Breizhad yaouank

ganet e Pariz pe e Saigon o lavaroud e vez Breizhad, pe ur paotr yaouank kelenner en Afrika, ganet e Porzh-Olued, o lavaroud e vez eus Lokarn (Bro e dud-kozh), e lavar ar re-se ur wirionez all kalz talvoudusoc'h ha yac'hoc'h. E Lokarn o deus tud kozh an den yaouank, a vil-bell'zo, difraostet douar, savet ti, karet, ganet bugale, labouret a-gevret ha kanet ha dañset ha pedet gant o amezeien. Bet int Bonedoù ruz ha c'houezhet tan e kastell pe gastell ; bet int Chouaned ha toullgofet Re-C'hlas. Er vered emañ ar boultrenn anezho. Ha d'an den yaouank-mañ, a-drugarez dezho, Lokarn en deus miret kenberc'henniezh war un teñzor dispar : kroaz arc'hant, kalir arc'hant, relegouer-penn ha relegouer-brec'h krouer ar barrez : Sant Hern, gant ar relegoù. Bourc'hizien gallekaet an Dispac'h Gall a fellas dezho teurel o c'hraban warno ; met gwazed Lokarn a lavaras : "Arabad" hag aze emaint bepred, hag an den yaouank taolet ha distaolet gant ar vourc'hizien a-vremañ a zo bepred kenberc'henn warno. Menegiñ a c'hellan ober ivez testení un den a oa deut da wela-denniñ ac'hanon warlene. An den-se, un Amerikan, anvet Mikael Zwerin, en doa prestet din ur pennad anvet "Me 'zo eus ar vrose" e-lec'h ma skrive : "abaoe ur bloavezh emañ o klask gouzoud piw on. Divizet em eus kuitaad ar c'hêrioù bras ha deuet da chom en ur gêriadenn vihan eus kreisteiz Bro-C'hall. C'hoant am eus d'anavezoud an dud a vev en dro-din, heb na vefent re niverus, heb na vefe red din prenañ an nor outo.

A-walc'h gant an arallekadur, red din kaoud va c'hempouez. Sonjal a ra din e rankin en em dreiñ etrezeg a rannvroioù e-lec'h m'o deus an dud gwrioù, bezañ ledeg eus ur gumuniezh wirion rag va c'herent a zo strewet e pevar c'horn ar bed ha va gwrioù a zo disec'het e bili-raz ar Manhattan. Damerzet em eus un dra bennak, a gav din, war daoulagad Nicole ar Garrec, ur Vreizhadez yaouank, o pleal gant ar sinema e Breizh, en doare ma komze eus he c'hêriadenn, eus al labouerien-douar hag ar besketerien m'emañ o filmañ... er garantez a zo enni evid an dud vunud a ra lod eus he buhez... Tud war an oad, eus an tu dehou alies, hogen he c'halon a zo stag outo, o vezañ m'int ganet war ar memes douar..." ... Met ar re n'int ket bet biskoazh diwrizienet, n'hellont ket kompren seurt tri-vliadoù...nag ar poan-spered gouzañvet gant o c'henvroiz di-vroet. (1)

Ar re na vezont ket kement-se a zo bet e skolioù ar vourc'hizien gall. N'eo ket evid o zamall e lavaran. Med evid goulenn diganto diwall ha pouezan o mennozioù hervez ar wir vuhez. Darn anezho o deus klasket e Karl Marx ar wirionez nac'het outo er skol. Hogen daoust pegen lemm e oa spered Karl Marx, evel peb den, ne wele an traoù nemed "gant e zaoulagad e-unan".

(1) Notenn : D'ar re-se e kinnigfen a-walc'h levr mantrus Armand Robin. Anvet : "Ma vie sans moi" embannet e ti Gallimard. An titl a lavar pebra diwar-benn ster ar barzhonegoù ha renzioli yezh an DIVROIDI : Va buhez a zo bet strewet a-beb tu ; me zo chomet e Plouguernevel.

Ha setu e oa Yusev, en amzer n'o doa ar Yusevien na bro nag esperañs da gaoud. Un harluad a oa ouzhpenn : un Alaman harluet e Bro-Saoz. Bro-Alamagn ne oa ket c'hoazh unanet, hag a oa o klask hen ober, d'an ampoent ma oa enni ar vourc'hizien o krouiñ an ijinerezh. E Bro-Saoz e oa an ijinerezh o ren, hag an Impalaeriezh oc'h en em ledañ dre ar bed a-bezh. Dre ma oa trueg ar broleteriezh, ha nebeud a emskiant dezhi ouzh he nerzh, n'helle ar framm broadel talvezoud nemed evid gounid ar vestrelezh. Rag-se e oa red kevrediñ ar proleterezhioù-a-eneb d'o bouchizelezhioù. Aes kompren en dije Karl Marx maget disfis ha kasoni ouzh ar broadoù hag ar broadelouriezhioù. Aes kompren en dije goveliet ar frazenn vrudet : "Proleterion a holl vroadoù, en em unanit".

Abalamour d'e orin Yudevad, d'e blanedenn a harluad ha dreist-holl d'an degouezh istorel m'edo o vevañ, e oa tonket da veizañ ar broadoù hag ar vroadelouriezh evel un dra nac'hel. Eston ebed en dije bet kredet e vefe dieubet an trevadennoù dre hanterouriezh proleterion ar vro-benn, da lared eo, dre un dieubidigezh kevredigezhel. Marteze ivez en dije kemmet a venoz o weloud argerzhad an didrevadennañ en XXvet kantved er Vietnam, en Aljeria... ha moarvad er Martinik. Nann Karl Marx ne oa ket "plaset mat" evid kompren gwir gudenn ar vroad... Gwelloc'h e vije goulenn kentel digant Anjela Duval...

Abaoe Marx hon eus gwelet skouerioù all, ha dreist-holl skwer Aljeria. Darn eus ar Varksourien (ar gomunourien) n'o deus ket komprenet darvoudoù Aljeria. Evel m'hen diskouez Memmi en e levr "Juifs et Arabes" e vanas ar c'hoztezennoù komunour dic'halloud, ent-damkaniezhel dirag dihun ar broadoù, ken distreset ha gwariet ma oa o gweledigezh eus an Istor gant an hengoun varksad. Mard eo gwir, hervez kempoellegezh ar varkselezh, ez eo an ober a wirieka an damkaniezh, e tlefe drouziwezhioù ar strolladoù komunour el lodenn vrasañ eus ar broioù didrevadennet, servijoud da brouiñ o deus ar re-mañ komprenet fall an didrevadennañ. N'heller ket kenderc'hel d'ober implij eus ar gadoniezh. A-benn ar fin e teu ar gwirvoud d'en em venjiñ hag alies gwech e vez bountet ar gomunourion en toull-bac'h gant ar renerien nevez.

Ha n'eo ket peent en em c'houlenn peseurt abeg damkaniezhel a zo penn-kaoz d'an drouziwezhioù-se ha kregiñ a-zevri da adtalvoudekaad an devoud broadel ? Ar varksourion o deus lakaet en o fenn e oa ar stourm broadel un dra nac'hel, o kuzhad an dra nemetañ en doa talvoudegezh : stourm ar renkadoù. Ha ma vefe stignet ar gudenn en un doare all ? Ha ma vefe gwelet ivez an dieubidigezh broadel evel un arc'hadur positivel ? Ha ma vefe merzet evel un araokadenn denel ? Evidon-me, darvoudoù Aljeria a zo kentelius. Gwelet hon eus komunourion hag a felle dezho e vije chomet Aljeria dindan ar Vourc'hizien c'hall. Hag e Breizh kenkoulz all, ez int ken aheurtet ha n'eus forzh pe "radical" a c'hiz kozh : a-du gant mestroniezh ar vourc'hizien hag ar gouarnamant-kreiz o vac'hañ Breizhiz. (cf. levr An Danteg P. 313-314 a-zivoud emzalc'h ar P.C.F. e Breizh). Diaes eo krediñ emaint o klask mad ar Bobl : mad kement pobl a zo a reket e vefe ar bobl se ur Vroad "mestr er gêr", ha n'eo ket ur rannvro suj, nag ur bagad tud a labour kas-degas.

Ma ne c'helle ket Karl Marx gant e holl gomprenazon kompren gwir gudenn ar Vroad, en dije bet gallet hen ober ma vije bet Iwerzhonad pe Boloniad, rag neuze en dije bet anavezet ar gudenn. Re all a oa en e amzer hag a felle dezho diazezañ ar gevredigezh war ar Frankiz, hag ar re-mañ o deus komprenet ne c'hell ket frankizoù an den mont an eil hep eben : Ar Frankizourion pe Liberaled. Displijus eo komz eus an dud-se... Perag ? Felloud a rae dezho dieubiñ an dud war beb tachenn :

- 1) politikel (dre an demokratelezh)
- 2) broadel (Iwerzhon ha Polonia a oa en o c'halon)
- 3) Kulturel (breur La Mennais hag a oa Vikel Vras Sant Brieg en dije bet c'hoant da grouiñ skolioù brezhoneg.
- 4) hag ekonomikel.

-(2) Hogen amañ emañ an dalc'h. Rag ar frankiz ekonomikel evito a oa (hag a zo) frankiz ar c'hevezerezh, frankiz d'ar re c'hal-loudusañ da vougañ ar re wan ("an houldi kamm" evel ma lavar ar gouarnamant gall a-vremañ). Setu perag eo displijus reiñ meulodi d'an dud-se. Hogen komprenet mad o doa un dra d'an nebeutañ : e tle ar frankiz ren war beb tachenn a-benn ma vo an den un den... Ha war dachenn ar Vroad ivez.

Ar frankiz ekonomikel avad n'eo ket aes da ziazezañ e bed an Ijinerezh hag ar C'henwerzh etrevroadel. N'eus nemed gweloud skwer Bro-Rusia, o klask ober politikerezh etre-vroadel ; ha kement a boan dezhi o tigeriñ d'an ekonomiezh etrevroadel. Ur frealz avad eo gweloud Piaget hag ar C.F.D.T. o klask an diskoulm : penaos reiñ frankiz d'ar micherour war dachenn an ekonomiezh. -

Rag, ma'z eus ur gwaskerezh broadel, e ranker respont dre un dieubidigezh broadel. N'eus forzh penaos ez eo ken euzhus ar gwaskerezh-se hag ar re all.

Levrig Felicite de la Mennais "Komzoù un den a gredenn" n'eo ket bet troet e brezhoneg, din da c'houzoud. Ma vije, e ouije peb brezhoneger desket ne c'hell palez ar Frankiz chom en e sav heb e beder moger : broadel, politikel, kulturel, ekonomikel simantet gant ar Spered-bro. Da betra e talv votañ da zibab etre danvez-deputeed kinniget gant koztezennoù ne reont van ebed ac'hanoc'h nag eus ho pro, nag eus ho kultur, nag eus ho poan-bevañ ? Da betra e talv deoc'h bezañ gopret uhel mard oc'h ur mevel e labouradegoù pe vurevioù ho mistri ? Pe zen, pe varmouz pe beroked oc'h c'hwi, ma ne c'hellit komz na kanañ nemed ar pezh a vez desket deoc'h er skol hervez "programm" ar renerien c'hall ?

Ul levrenn studi war ar Vroad ! Savet gant Skol an Emsav ! Biskoazh kemend-all ! Ken pell zo e veze lavaret "La Bretagne est une nation", ken pell all veze eus broadelourien dre ar vro ha padal, gwech ebed na oa bet studiet pezh oa ar vroad. Gwir eo, un nebeud diouganerien a embanne beb an amzer ar wirio-
nez c'hlanañ war an dañvez ha trawalc'h oa, med studiadeg digor ebed na oa bet. Setu 'ta ma zo deuet un intrudu dispac'hel gant Skol an Emsav.

Gwir eo ive eo Skol an Emsav gwall gonsernet 'ba'n afer. Ha ne oa ket-hi broadelourez penn-kil-ha-troad ha deus ar re "gwenn-ha-du-oc'h" ouzhpenn-se ? Un tamm cheñchamant zo deuet enni, hervez, gant an nevez-hañv, e 1974. Daoust ha don oa ar cheñchamant-se ? Adlennit displegadenn hollek ar c'hinnigoù bet degemeret e miz Mae 1974 gant tud SAE. Komzet vez enni, naturel-tre, eus ar vroad vreizhat zo ar brezhoneg an elfenn gentañ anezhi. Yezh vroadel Vreizh eo ar brezhoneg. N'eo ket dav folliñ; ma'zo bet degaset ha degemeret gerioù oa berzh warne gwech all, gerioù evel sokialouriezh ha ne oant ket brezhoneg mad zoken, miret eo bet memestra ar peb pouezusañ, ar peb priziusañ eus an teñzor : ar vroadelouriezh. Tu vo c'hoazh -a-dreuz glander ar yezh da skwer- anaoud an deñved reizh diouzh ar re fall.

Nag a draoù vije c'hoazh da lavaret diwar-benn an displegadenn holleg-se ! Trawalc'h eo amañ gwelet ema c'hoazh Breizh-broad e-kreiz bed-welidigezh SAE. Kudenn ar Vroad zo c'hoazh daktualite 'ta.

Med ma'z eo broadelour bed-welidigezh SAE daoust ha puilh e vo ar preder diazezet war meiz ar vroadelouriezh ? Setu al levrenn-mañ, diwar-benn ar vroad, en em gav SAE outi hec'h unan : daoust ha gouest e vo da vezañ pezh a fell d'un toullad e vije ? Daoust ha disoc'hoù ar brederiadeg vo diouzh taerder an uhelvennad broadelour vez embannet ? Ma n'eur ket evid embann sklaer pezh eo ar vroad (Vreizhad) ha pezh eo palioù ar vroadelouriezh, koulz vo dê dilezel menozioù ha n'o deus kaset SAE betek vremañ nemed war hentoù dall.

Diouzh ma zu em eus displeget pellig 'zo, a lavarferc'h, ma soñj war gement-se. Med 'benn ar fin n'eo ket tre ma soñj war ar Vroad em boa bet embannet, kentoc'h oa ma soñj war an doare oa gant Skol an Emsav d'en em zibab gant he broadelouriezh de'i !

Hogen ur wir studiaden war ar vroad, nag ul labour ramzel ! Meur a du zo da vont gant ar gudenn. Petra eo ar Vroad ? Daoust ha bez'ez eus diouti ?

N'eo ket aezet respont da seurt goulennoù rag n'eus ket tre ar memes ster, a lavarer, gant ar ger broad hervez an dud. Meur a c'her zo zoken ; broad, broadelezh, nation, patrie, nationalité. Meizadoù a vez roet dê ur ster ideologel gwall zisheñvel ez int. Penaos lec'hiañ 'nê an eil e-keñver egile ? Pe seurt darvoudennoù gwirion zo a-dreg dê ?

Setu e glaskin gwelet da zigentañ petra eo la "nation" (da laret eo ar vroad el lavar broadelour gall). Ha goude petra eo ar vroad vreizhat, daoust ha bez'ez eus diouti ? Petra zo da gonkluiñ da geñver ar Stourm evid ar brezhoneg ?

LA NATION.

Petra eo "La Nation" ?

Ne fell ket din mont da glask laou metafizikel hag a-hend-all n'on ket mailh a-walc'h war an istor d'ober un istorig klog war an danvez.

Ne yin ket da glask re bell. Kaoud'ra din e c'heller laret ez eus bet graet da vat gant ar ger "nation" (war un dro gant ar ger "Patrie") da vare an Dispac'h gall, un nebeudig a-raog zoken. (1)

Petra c'hoarvezas d'ar mare-se ?

E Bro-C'hall e-kreiz an XVIIIe kantved oa bet deuet kreñvoc'h-kreñvañ ar vourc'hizelezh oc'h enebañ muioc'h-mui ouzh ar renad kozh hag ouzh an noblañs a zalc'he de'añ blamour d'he interestoù de'i. Diskar anezhañ voe dao d'ar vourc'hizelezh evid gellout mont pelloc'h war-raog. Urzhiañ diouzh e vod an dachenn douar oa deuet en he galloud, hag an dud oa e vevañ warni, a reas hi.

Med da gemer plas reizhegezh ar Roue a sikoure gwech all da zerc'hel holl a-gevred ar pobloù dindan e c'halloud, e voe dao krouiñ ur reizhegezh nevez. Hini ar vroad 'ni' voe. Pobloù disheñvel ha rummadoù tud disheñvel a vije dê an heveleb interestoù zo evel ur c'horf nemetken.

"La Nation" hag a gemeras, en un doare, plas ar Roue oa bet implijet ive gant ar vourc'hizien da justifiañ he stourm ouzh ar Rouantelezh. Setu ur poz tennet eus "cahiers des doléances des notaires" : "La France est une monarchie, le roi étant le chef de la Nation (...), l'autorité souveraine ne pouvant s'exercer en matière d'impôts que par le consentement et l'octroi de la nation".

(1) notenn : Kresk bras zo bet gant ar veizadeg "nation" d'ar mare-se. A-raok se e c'heller merkañ ur mare kreskiñ all : an azginivelezh. (Med ma voe kresk gant an darvoudenn "vroadel" ne voe ket implijet ar meizad broad da vat). Diwanañ e kreiz ar Grennamzer a reas ar vourc'hizelezh. Gant he bountad kentañ e voe adurzhiet ar gevredigezh hag echuet gant marevezh ar Grennamzer. Ha gant kresk kentañ ar vourc'hizelezh e tiwanas ar spered broadelour evid ar wech kentañ. An ezginivelezh c'hall, luskañ ar Pleiade, kemmenadur Villars Cotteret zo an adskedoù sevenadurel anezhañ e Bro-C'hall. E Breizh en em gavas, a gred din, kemend-all e fin ar XVvet kantved hag er XVIvet.

Meur a zarvoud eus mare ar Stadidigezh hen diskouez (Catholicon, P.Landais, Seziz an Naoned). Ne gomzin ket eus ar c'hresk kentañ-se rag ar bed a-vramañ hag an emsav zo enne kalz kreñvoc'h merk an eil kresk.

"Le Tiers embrasse donc tout ce qui appartient à la Nation, et tout ce qui n'est pas le Tiers ne peut pas se regarder comme étant de la nation". (Qu'est-ce que le Tiers-Etat - Sieyes).

Lenomp c'hoazh pezh a zispleg un istorour gall -ha n'eo ket marxour- an Ao. Guillemin : "E-kerz an XVlllvet kantved oa bet diwanet ur renkad nevez war c'horre rummad an dud dinobl. Renkad an drafikerien, ar genwerzhourien vras, ar Vanufaktourourien, ar vankourien an hini eo. Med gant an noblañs, an Iliz gant "ar binvidigezh immobilier" ni'ema ar galloud, a-drugarez d'ar Roue, ar re-mañ zo e penn ar stad hag eveljust ne baeont ket an tailhoù. Barnave, implijad ar b-Perier-ed -ar re-se hag a zo just a-walc'h eus ar renkad e vont war gresk-, Barnave'ta eo an hini a embann "eo dao lodennañ ar galloud diouzh lodennidigezh nevez ar binvidigezh". Pezh sinifi fell deomp bezañ ar vistri d'hon zro. Ha tro-widre Sieyes vo ober nation eus al lodenn uhelse eus an Tiers Etat. Berzh a raint a -drugarez d'ar freuz-stal pe gentoc'h ar freuz-stad hag a-drugarez dreist-holl d'ar peurrest eus an Tiers-Etat, ar re baour, al labourerien (98 % eus an Tiers) bet bodet er straedou ha kaset ouzh ar Bastille gant ar pennoù-bras evid reiñ an tu dê da vont tre er gouarnamant. Med d'o zoull e vo kaset en-dro an astud-se kerkent ha sevenet an taol oant bet galvet d'ober. Buan hag aes eo bet lamet o armoù digante. Savet vez evid o evezhaad ur milis bourc'hiz treuzwisket e "Garde Nationale". Miret vez deus oute votiñ. Anvet int da "geodediz gouzañvus" (citoyens passifs) ur gavadenn all a-zoare c'hoazh gant Sieyes, o roll dê zo "magañ, sioul ha didrouz ar re a vev hag a denn o finvidigezh diwar o c'houst." (Napoléon tel quel).

Peetra zo bet c'hoarvezet abaoe ? N'eo ket bet distanet ar jeu gant ar vroad, gant ar vroadelouriezh-se abaoe. En em gavoud ra fidel da beb "grande cause nationale". Travail, Famille, Patrie. Adkavet 'vez hi gant Napoleon III, en afer Dreyfus, e 14-18, evel e 39-45. Splann eo he roud.

Ma z'eo bet an Nation un touell evid ar pobloù bihan evel Breizh, Euskadi h.a. ez eo bet ivez, ha dreist-holl, un touell evid ar werin, ar bobl vunud.

Pezh seurt mod ema kont ba'r broioù all ?

E Bro-Saoz, war a seblant, n'eus ket bet graet un implij ken meurdeus eus ar ger-mojenn-se. En emgavoud er galloud a reas ar vourc'hizelezh eno dindan baeroniezh ar Rouantelezh. Ur reizhegezh hag ur c'huzh-taol oa evite ar Rouantelezh sederse ha padus. A-hend-all oa Bro Saoz pe Breizh-Veur un enezeg : Aezetoc'h oa lakaad an dud d'ober un disparti etreze hag ar broioù all... Med ar memes soñj zo gant ar Saozon eus ar ger Nation. Ma vez graet nation eus Bro Gembre pe Bro Skos, ne yaer ket da soñjal ez int gwir Nationoù...

Bro Alamagn ? Bro Spagn ? Bro Italia ? Be c'hellit studiañ an holl anê. Broioù savet al lod brasañ anê da vare donedigezh ar Vourc'hizelezh d'ar galloud ez int he diouzh hec'h interestoù de'i eo bet stummet an holl vroadoù-se.

Bro c'hall n'eo ket ur vro dibar, pezh em eus lavaret diwar-benn an nation e Bro C'hall zo gwir er broioù-se ivez.

AR VROAD.

Med sklaer eo eveljust n'eo ket tre heñvel "la nation" hag ar "vroad". D'an nebeutañ "nation" gant ar ster ofisiel ha broad gant ar ster "emsavel". Eneb int penn da benn da geñverioù zo : n'eus tu ebet da lakaad da glotañ tiriegezh ar Vroad c'hall hag hini ar vroad vreizhad. N'eus tu ebet da varn ar "vroad" diwar dielfennadur an "nation" rag e gwirionez ez eo ar vroad hag an nation daou vezad disheñvel ha lusk an dud a ra gante zo disheñvel-krenn.

Renkomp diouzh un tu'ta la nation pe patrie (française, Allemande...) ha diouzh un tu all pezh vez anvet broad, broadelezh pe pobl, etni, pe c'hoazh nation minoritaire.

Istor ar vroadelouriezh e Breizh :

Pedavare e tiwanas ar spered Broadel e Breizh ? Gant ar studioù war ar brezhoneg, gant embannadur ar Barzhaz Breizh, a larer ordin, e krog an Emsav.

Gant kreskidigezh an "nationalism"-où hag ar romantelezh e voe dedennet kalzig a dud gant ar "werin" gant an dud vunud.

Rousseau, unan eus ar filizofourien oa kannaded ar "menozioù nevez", en doa diskouezet hent ar maezioù. Deuet oa bet ivez lodenn uhelañ an Tiers da vezañ degemeret e kelc'h ar renerien ha diglozet voe bed ar gouerien, bed estlammus an amzer dremenet, ur bed truezus ; truezus rag tonket da vont da get da vezañ krignet evid laret gwiroc'h : eno 'ni'oa an danvez labourerien da zont, eno'ni'oa kavet gwerzh evid lod eus produad an ijinerezh nevez c'hanet, hogen interestus oa ivez rag eno e c'helle aotrounez ar renkad "immobiliaire" kaoud c'hoazh o finvidigezh, bremañ pa oa dao dê lodennañ ar galloud gant ar vourc'hizelezh kenwerzhel hag ijinerezhel, interestus oa ive bed ar gouerien rag urzhiet kaer oa gant an Iliz hag ur skoazell oa evid an aotrounez en o stourm ouzh ar vicherourien.

Ur wiñs pouezus e gwikefre ar gapitalouriezh e tiorren oa bed ar gouerien ha dre se oa dedennus hag interestus. Roet voe ar gwir dezañ bezañ skeudennet el lennegezh (St.G.Sand, V.Hugo, Balzac, Brizeug h.a... e Bro C'hall koulz hag e Bro Saoz).

E-kerz al luskad-se tuet war zug tud ar maeziou en em gavas tud e Breizh oc'h ober war-dro gwerin Vreizh. Studiet voe ar brezhoneg ha dastumet kontadennoù, kanaouennoù pobl gant ar Gonideg, Kervarker, An Uhel, Milin... Troet voe kalzig tud zo da skrivañ beb a dammig e brezhoneg.

Daoust ha broadelouriezh a entane kalon an dud-se ? Lavaromp kentoc'h brogarantez (1'). Brogarantez liesliw, hiraezh enni eus ur bed 'vont da get marteze, hirnezh eus ur galloud m'o deus ket bet (Sl.Mojenn Ker Is, Taldir, an URB) ha surtoud, ur vrogarantez c'hoant enni miroud ar bed-se... hag evid lod, o gounidoù e tont dioutañ (Nag arouezius eo pezhioù c'hoari Ar Moal da skwer, a vez ur gentelig a peb hini anê a zisplege oa dao d'an dud e Breizh miroud o gwiskamantoù kozh, o boazioù kozh, o feiz kozh, chom heb mont da Bariz da labourad ha chom heb prenañ marc'hadourezh eus a ziavaez bro... Hag en holl skridoù, pe dost eus ar mare-se e veze adkavet kemend-all).

Tud zo'fell dê displegañ al luskadoù-se evel ul luskad renkad, bourc'hizelezh Vreizh e tifenn hec'h interestoù. Ne soñj ket deomp ez eo bet. Daoust ma oa merket-tre brogarourien ar mare gant o renkad, ne oa ket an holl vourc'hizien e Breizh, pell alese, e tifenn o interestoù evel-se. Ul lodennig anê nemetken oa a-du gant ar stourm breizhad, an darn vuiañ a frikote gant ar galloud gall hag ar Vourc'hizelezh c'hall. Orel (marginal) a-walc'h oa bet an Emsav, a larer, hag oa bet.(2).

Diwanet dre greskidigezh ar vourc'hizelezh hag hec'h ideologiezh ez eo bet ar vrogarantez evel un heklew d'an nationalismoù : memes seurt displegadenn eus an Istor teue gante, memes fealded d'ar feiz kozh...

Med gant an amzer ha kresk an impalaouriezh c'hall teuas ar bed kozh da freuzañ. An hent-houarn hag an divroadeg oa an talar kentañ. Echu oa gant ur prantad zo ha gant un emgann, emgann an interestoù (eeun pe dieeun) stag ouzh ar bed kozh. En I-liz memes e krogas an traou da dreiñ, ul lodenn vad a droias war zug ar galleg ha Pariz (Na diaes voe graet da Yann Vañ Perrot da skwer).

Notennoù : (1' ha 2).

(1') Ober a ran gant ar ger brogarantez amañ rag ar ger-se an hini oa implijet d'ar mare-se. Brogarantez oa ive hogen muioc'h evid karantez bro eo. Brogarantez pe Karantez-bro zo e ster kentañ un trivliad a garantez zo en dud deus o bro, o c'horn bro, deus an dud o deus bevet gante, deus kustumioù ar vro, ar vuhez enni, ar "gweledva"... Un trivliad dispis ha levezonapl gant a beb seurt elfennoù eo. Muioc'h evid-se eo brogarantez an Emsav-se eveljust : ur soñj politikel, dispis marteze, zo ive enni. Med n'eo ket c'hoazh broadelouriezh taer hag elaboret lod eus an emsav a-vremañ. Ar c'hemmoù, bras alies, a c'hoarvez er vroadelouriezh deus ur mare d'un all zo a-bouez o anataad hag o displegañ.

(2) Nag ur vez e vefe laret gant lod, goude-se, ez eo Istor an Emsav Istor gwirion Breizh ! Pa oa an Emsav marjinal, pa oa aet an holl zarvoudoù istorel e Breizh kontrol d'ar pezh a glaske hemañ sevel pe derc'hel !

Nebeutoc'h a dud a chomas e stourm, intellektualed al lodenn vrasañ nê, tud eus ar bobl alies, o doa dizoloet, pa oant dedennet gant danvez Breizh, ar gaou graet ouzh tud ar vro. Ar re-se ni'yeas d'ober an eil Emsav, intellektualed nevez-stummet na oant ket stag ouzh ar bed kozh hag a voe taeroc'h. Stourm ouzh ar gudenn oant kizidig outi a raent, ouzh ar gwaskerezh, ar wastadurezh sevenadurel. Pa voe politikel o stourm eo a-zi-war ar preder-se'ni'oa urzhiet, ur politikerezh idealour 'ni' voe 'ta. Intret-holl gant an ideologiezh vourc'hiz e oant ha dao voe dê reizh-abegañ ouzh an ideologiezh ne lakaent ket en arvar, o oberioù a yae, en ur c'heñver zo, kontrol da houmañ.

Kement-se ne c'hellent ober nemed e termennoù an ideologiezh oa o hini : setu e oant war hent ar vroadelouriezh "diskuliet" (explisit) krog oad bet gant se e fin ar c'hentañ Emsav (sl.la Borderie) ha dont a reas war wel da vad gant an eil Emsav (NB 1911, Gwalarn, Breiz Atao).

Stummet-spis teuas ar vro-vroad da vezañ, stummet diwar skwer "nation" an nationalism. (3). Ur vroadelouriezh deuet d'hec'h oad gour.

Dalc'het voe gant ar vroadelouriezh goude an eil brezel bed. Kreñvaet voe c'hoazh menoz ar vroadelourien er brezel bed. Kreñvaet voe c'hoazh menoz ar vroadelourien er geto ma voe bac'het an Emsav ennañ, beteg disoc'hañ war un damskizo freniezh politikel : Emsav Stadel Breizh (Mouvement étatique de Bretagne !) Ar vroadelouriezh klanvidig "ni" eo.

Ganet eo bet ar vroadelouriezh en degouezioù istorel em eus klasket displegañ berr ha berr. Klasket he deus en em ober diouzh pep marevezh ekonomikel e Breizh. Med daoust ha derc'hel a ray sonjoù a-seurt se en ur mare disheñvel-mig pa ya al labour douar war vodernaad ur spont, beteg bezañ enteuzet er sistem kapitalour, pa teu ar c'herioù hag ar vicherourien da vezañ pouezusoc'h-pouezus ?

Daoust ha galloud a ray ur meizad-repu, savet en ur mare a varo, en ur bed kozh, evid derc'hel d'ar bed kozh-se, dreistpadoud pell en ur mare a vodernaad hag a gemmoù, evid o rekupe-riñ ?

Daoust ha derc'hel a ray pell heklew ideologiezh ur sistem zo war var bezañ dismantret ? (4).

Notennoù : (3 ha 4)

(3) Heñvel oant evit gwir, nemet 1) oa diaesoc'h dê anataad o broad evel unan gwirheñvel rag ne oa ket e Stad gante ne oa ket ar galloud gante 2) Rag-se oa a-wechoù klanvidik a-walc'h an doare da gempouezañ er soñj hag ar gwirvoud. (da skwer Celtisme Mordrel pe an drouizelezh).

(4) Ha be zo diouganerien ar vroadelouriezh hen goar mad. Y.O. da skwer en em ziskouez chalet-tre gant enkadenn an talvoudou kornogañ, gant ar sevenadur kornogañ ha ne gav tra d'en em zifenn nemed ar gravez (ar relijion) hag a zo diazezet warne'i pep youl denel gwirion ! ... Ha 'n em serriñ ra ivez ouzh peb displegadenn all...

Danvez ar vroad :

Taolennañ orin hag istor ul luskad, ur meizad, n'eo ket e zielfennañ penn da benn. Dao vije studiañ ive petra larer ez eo ha daoust, da skwer, hag evid gwir, ez eus un dra bennaket a c'heller ober broad vreizhad dioutañ ?

Bremañ, e-kreiz an "Dihun" evel ma lavar Per Denez, da laret eo e-touez ar c'hemmoù zo c'hoarvezet e Breizh er maremañ, e vezer krog da gemm ivez, bep a dammig, doareoù zo veze gant ar vroadelouriezh. Lod zo aet en tu-hont da vroadelouriezh an Emsav kozh. Pev hini vez gantañ e arliw dezhañ war e vroad, pep hini en deus pe dost e zoare da gompren "Breizh zo ur vroad", hogen tu zo lodennañ nê, dre vras e tri rumm. Be zo broadelouriezh an Emsav kozh, hini an UDB, hag ar vroadelouriezh "gochist". (5).

Ar vroadelouriezh kentañ zo an hini zo disoc'het eus an emdroadur taolennet uheloc'h. He doareoù em eus diskouezet bet spisoc'h ur pennadig zo evel ma vezont, pe vezent kavet e Skol an Emsav. An daou seurt all a vroadelouriezh n'o deus ket bet kalz a dadoù kozh en Emsav a wech all : Emil Masson ha Yann Sohier zo daou anezho, ne oa ket kalz a genseurte gante. Harpet eo ar vroadelouriezh-se deus un toullad abegoù ekonomikel. Pa glaskfen krennañ pennaennoù broadelouriezh an UDB e lavarfen eo harpet war ar soñj ez eus deus Pobl Vreizh ha war an dielfennadur a anata Breizh evel un drevadenn. En em ziskouez a ra an trede broadelouriezh muioc'h tuet gant stourm ar renkadoù e Breizh hag e broioù bihan evel d'hon hini, tost kement hag e hañvalont bezañ e-kerz ur fenomenologiezh eus ar stourmoù e Breizh.

Med ne yan ket da zielfennañ kement doare zo gant pep hini nê, na keñveriañ o soñj diwar-benn ar vroad. 'Vije fin ebet, ha n'eo ket se pal ar skrid-mañ.

Kentoc'h merzoud ez eus un dra bennag boutin kenetreze (hag abalamour da se 'ni' m'eus graet broadelouriezh dioute holl daoust na vije ket lod a-du gant-se). Krediñ a reont holl ez eus e Breizh un unanderenn, ur voudelezh (entité) bennaket, pe me oar-me petra, erfin un dra bennaket, vez graet dioutañ broad, broadelezh, nationalité, etni, peuple, entité, totalité, nation a-wechoù... Un dra bennaket eo, e gwikefre emdroadur an Istor, talvoudegezh ennañ eta, un dra bennag fonksionel e-ser an argerzhad kevredigezhel, evid komz droch. Komzet 'vez dre-se eus dieubidigezh vroadel, eus "vocation nationale", eus azgini-velezh ur bobl ("renaissance d'un peuple"), eus "mentalité collective".

Notenn : (5).

(5) Un nebeut hiniannoù n'int ket bet renket en tri rummad-se (KV.not. 3)

E-lec'h bezañ stad ennomp e tizoloiñ ez eus kenzeurtes deomp 'ba'r bed -daoust dê bezañ brizhkenseurtes- evid goude-se en em chikanañ da c'hoûd gant piw ema ar wirionez, e vije koulz klask goûd da zigentañ daoust ha petra eo ar voudelezh-se, an dra bennaket-se, daoust ha bez'e c'heller laret ez eus dioutañ ?

Amañ vo dao din chom berr -anez skrivañ levrioù- rag petra c'hellfe bezañ ur vroad, pe ur bobl, un etni, ur vroadelezh, ur stumm spered-stroll, an deiz hiziw, unan a vije unvan a-walc'h e Breizh ha dispartiet-kaer diouzh Bro-C'hall ? Diaes eo din ijinañ kemend-all dreist-holl pa n'em eus biskoazh ka-
vet gant strollad broadelourien ebed, spisadur sklaer ebed eus ar voudelezh-se, eus an "dra-se", na kriter ebet da brouiñ ez eus dioutañ ha da c'hoûd eus petra gomzer. Penaos eta burutel-
lañ un dra n'heller ket goûd petra eo ? (6) Setu a zegouezomp amañ un disoc'h a-bouez d'am soñj.

:
:
: Den e Skol an Emsav ne oar evit gwir petra eo ar
: vroad vreizhad ha daoust ha bez'ez eus diouti.
:

:
: Krediñ gouzoud ne ra ken lod arê. Evid mont pel-
: loc'h eo dao 'ta da SAE bezañ dishualet diouzh ar vroad-
: delouriezh. N'eo ket ar brezhoneg yezh Vroadel Vreizh.
:
:

Hogen re stag eo broadelourien Skol an Emsav en o uhel-
vennad evid gelloud meizañ ne zisplegont ha ne brouont anezhañ
nemed en ur ziogelañ neañ dre o buhez hag o boud. Re eeun eo an
traoù dispaket evel-se, evid ma gredfe ar re amgredig. Klaskomp
'ta reiñ un tamm boued da vagañ imor lod ha preder lod all.

Peseurt kriter a c'heller reiñ d'ur vroad ?

Gwechall oa komzet eus ar relijion da verkañ natur Breizh.
Mod kozh eo se ha forzh penaos, ar relijion e Breizh a-vremañ...

Ar yezh ? (Kv okitaniz)... Ur yezh, ur vro met e Breizh
setu kantvedoù ha kantvedoù vez komzet diw yezh tost kement ha
kement. An istor ? med istor Breizh diouzh soñjoù ar vroadelou-
rien, n'eus ano ebed ennañ eus ar werin oa rummad niverusañ
Pobl Vreizh, ne vez komzet nemed eus an Aotrounez ; hogen plijet
vefen goûd pegement a wad brezhon oa e gwazhied duged Breizh
(lod nê kindirvi da Roue Bro-C'hall pe Bro Saoz) pe an noblañs
(Rohan, Blois...). Un emskiant broadel ? Ar bobl, bremañ, piw
laro ez eus un emskiant broadel ganti ?

Notenn : (6).

Ha pariañ rafen a-walc'h n'eo ket el levrenn-mañ vo gouezet gwelloc'h petra
eo ar vroad vreizhad da soñj ar vroadelourien... Ur brouenn ouzhpenn kontrol
d'ar vroadelouriezh.

N'eus kriter ebet, HINI EBET, a c'hallfe spisaad ar vroad vreizhad ha proviñ ez eus diouti. Ken gwir eo se ma ya lod eus ar vroadelourien da glask "la mutiplicité des facteurs" da brouenn. Hini ebed eus an elfennoù na zegas tamm sikour da anataad ar vroad vreizhad-se, he dro evel ur plac'h yaouank, med burzhud ! pa vezont lakaat mesk ha mesk e vezer egzaoset. Dont a ra hi war wel. Ha kement-se heb na vije dao displegañ peseurt gwikefre a laka ur galloud hud el luziad (Lod 'ra framm eus an elfennoù bet daspugnet evel-se, ar frammoù, ar strukturioù zo diouzh ar c'hiz, med n'eo ket trawalc'h reiñ an ano-se memestra...)

Menegiñ a rafen c'hoazh un toullad displegadennoù em eus bet klevet e-kerz an tabutoù "aner" ha "diabeg" em eus bet graet.

Ur vroad eo Breizh en abeg ma zo un Emsav e Breizh

Un emsav zo e Breizh ha dre se'ta eo Breizh ur vroad. Med petra eo an Emsav ? Lodenn pobl Vreizh zo emskianteg eus he broadelezh... Lu a-walc'h eo 'ta an displegadenn-se pa vez dispaket-splann, ne dalvezfe ket kalz ar boan komz diwar he fenn, met adkavet vez an hevelep arguzennerezh gant kalzig a dud en un doare diemskiantek, diazezet eo o soñj neuze war stourmoù zo vez e Breizh bremañ : an F.L.B., un nebeud grêvou "exemplaer" evel ma vez lavaret... hag an dud a-ziwar se krediñ eo Breizh ispisial ! ...

Ur vroad eo Breizh blam' d'he ferzhioù dibar

Un toullad perzhioù zo gant Breizh evel : ur yezh disheñvel, gizioù, gwiskamantoù disheñvel, un istor disheñvel, un dachennad douar. Ha dre-se eo Breizh ur Vroad.

Daoust ha dao eo diskouez ez eus dija ar soñj eus broadelezh Breizh e dezrevelladur ar perzhioù-se ? Ur yezh disheñvel ha na glot ket gant an dachennad douar, med ne ra forzh. Rankoud a reer bezañ etnoleg a-zoare da ziforc'hañ krenn gizioù peizanted Bro Roazon diouzh re peizanted ar Mayenn pe c'hoazh ar vuhez e kerioù evel Brest, Roazon, Kemper, an Naoned diouzh un tu ha hini vez e Cherbourg, Brissac pe Angers diouzh un tu all...

Breizh zo ur vroad blam' zo gt ar Vretoned un emskiant naturel

eus o broadelezh

An emskiant da vezañ gall zo bet lakaet dre heg en dud ha padal zo un emskiant da vezañ brezhon zo naturel. Setu...

Med n'heller ket laret eo "natureloc'h" un emskiant evid un all. Dre maoant Gallaoued dirag an impoioù, an arme, ar varc'hadourien, dre ma o deus bet graet brezelioù gant ar c'hallaoued "ni" eo deuet d'ar Vretoned an emskiant da vezañ gall. Ha deuet oa d'o zadoù kozh an emskiant da vezañ brezhon blam d'ar pezh o deus bevet, blam 'da vrezelioù an Duged, ur-zhiadur an dugelezh, da Vourc'hizelezh Vreizh an azginivelezh, d'an Iliz, d'ar Chouanterezh...

Med forzh penaos peseurt roll a-bouez e c'hellfe kaoud an emskiant e darvoudoù da zont an istor, e Stad ar gevredigezh da zont ? Ne c'hell ket hon emskiant goùd pezh vo ar bed a-benn un hanter gantved, traoù zo a c'hellomp goùd, med ar pep brasañ diwar-benn an denelezh da zont zo kuzh d'hon emskiant, n'eo ket eñ eta zo lusker an Istor na krouer un dazont n'eo ket evid anaoud.

N'eus tamm talvoudegezh 'ta gant seurt displegadenn.

Un drevadenn eo Breizh

Ar soñj kentañ a zeu a-ziwar an displegadenn-se zo kement-mañ. : 1) daoust ha disheñvel-krenn eo an traoù er Mayenn hag e Bro Roazon ? 2) Abalamour da betra dibab Breizh da gornbro da ziskouez eo trevadennet, koulz vije bet Breizh Izel, ar 4 departamant, l'Ouest ?

Da laret eo e gerioù meizadurel

1) Adal pe seurt "feur a drevadennouriezh" e komzer eus un drevadenn 2) Peseurt talvoudegezh zo gant an elfennoù "sevenadurel" zo e kont e anatadur un drevadenn ?

Setu un toullad refleksionoù zo bet refleksionoù profitabl din un amzer zo bet. Trawalc'h vo evid diskouez n'em eus ket graet war ar prim ma soñj diwar-benn ar vroadelouriezh ha n'eo ket ur rakvenoz 'ni' zo ganin. Daoust ma c'hellfer komz pell c'hoazh eus digarezioù pe emdouelloù ar vroadelouriezh eo gwell din soñjal e labour ar sekretourez, doujañ ouzh poan al lenner diakuit ha paouez gant ar burutelladur-se.

BREIZH HAG AR BREZHONEG

Eus an holl draoù-se e tiver un dra bennaket memestra : be'zo bet e Breizh, gwech all, pe ur bobl pe... erfin ne oa ket c'hoarvezet tre an hevelep darvoudoù evid e lec'hioù all ha roudoù a chom c'hoazh.

Un dra vad vije bet 'ta studiañ petra oa bet Istor Breizh (pe an Istor e Breizh). Re hir vije bet. Klaskomp memestra displegañ anezañ berr ha berr ha goud peseurt plas c'hell bezañ d'ar roudoù-se er bed a-vremañ hag en hini da zont.

Be'oa bet deuet, setu un toullad kantvedoù zo, da anezañ e Kornog Europa, ur bobl, meuriadoù kelt, a gomze hennvrezhoneg. Gant brezelioù ar feodaliezh, e kerz ar feodaliezh, marevezh m'en em dreuzfurmas ennañ renkad an aotrounez e renkad an noblañs hag a ziwanas ar vourc'hizelezh, oa bet savet eno ur seurt stadig e-dalc'h an noblañs hag ar vourc'hizelezh e koeñviñ, ennañ diskennidi ar bobl kelt-se ha lod eus pobloù amezeg. Dugelezh Vreizh 'ni'voe. Lonket voe ar stadig gant an amezeg gall galloudus (lonkadenn gentañ 1492-1532, peurlonkadenn 1789). A-hed an amzerioù-se e renas stourmoù a-ziforc'h e Breizh, ur urzhiadur un tammig disheñvel eus ar gevredigezh ha ne oa ket an ekonomiezh penn-da-benn er redva gall : ur sevenadur a larer a ziforc'h voe e Breizh eta.

Bremañ avat e c'heller laret ez eo bet enteuzet ekonomiezh Breizh, be'ema hi hag hini Bro C'hall e-kerz un ekonomiezh hebken. Ha diskaret eo bet sevenadur Breizh. (sellit ouzh pennad Helegoet e niv.6 Skol an Emsav diwar-benn ar sevenadur). Ne livirin ket n'eo ket dao diwall ha derc'hel kont eus ar c'hemmoù armerzhel ha sevenadurel zo bremañ a-ziwar an enteuzadur-se med daoust ha reizh eo diazezañ ur stourm kevredigezhel bennaket war an troellerezh a zeu a-ziwar ar c'hemmoù-se (petra bennaket a vefe a-wechoù liw ar gwenn-ha-du war ar trollerezh-se) pe washoc'h war elfennoù zo eus ar bed bet diskaret ? Dao eo er c'hontrol kemer skiant eus an darvoudennoù-se, kompren petra zo e c'hoari er bed e-lec'h m'emaomp, kompren ar gapitalouriezh hag he dazoned.

Petra zo kaoz d'an dilabour en hon bro ? Pe abeg d'ar brezelioù ? D'an dienez vez e broioù an Trede Bed ? Petra ra diaes ar Vuhez d'an dud er broioù a larer ez int diorreet ? Petra zo e tistruj ar vuhez war an douar ? Splann eo tonkad an denelezh dindan yeo ar gapitalouriezh, Pinochet, Chirac, Massu, ar Vietnam Lon Nol : ar sokialouriezh pe ar varbarelezh ni zo e gouestl.

Er stourm ouzh ar gapitalouriezh eo red deomp derc'hel lont eus doareoù un tammig ispisial deus an ekonomiezh er vro (al labour-douar, ar vicherourien beizant, kudenn an douristelezh hag hini an arme...) ha deus buhez an dud er vro (kudenn ar brezhoneg, kudenn ar re yaouank...). Hag er par-se "ni" vez dao lec'hiañ ar stourm Sevenadurel, e-kerz ar stourm eneb-kapitalour.

E Breizh-Izel e vez komzet brezhoneg ha felloud a ra da lod eus ar re yaouank gouzoud brezhoneg, da gompren ar re gozh, da gomz gante da gaoud lorc'h ha nerzh enne da enebiñ ouzh ar sistem sevenadurel gwasker marteze, da anaoud gwelloc'h ive istor o bro, da gompren gwelloc'h 'benn ar fin pezh zo c'hoari tro dê ha da stourm da wellaat an traou. (7).

Ur skol emsavel a vije he fal sikour ar re yaouank-se d'anaoud o bro : yezh, dañs, kanaouennoù, kudennou politikel. Kement tra a roy tu dê da gemer o flas e buhez kevredigezhel ar vro, da laret eo ivez er stourm deus ar gapitalouriezh. (8).

N'eo ket dao da Skol an Emsav klask e-lec'h all ebet he zrevell, med kement-se holl zo d'ober. Labourioù resisoc'h vije d'ober med ne c'hellfed komz diwar o fenn nemed pa vefed e stourm war an hent mad dija ha n'eo ket amañ war baper. Evid bezañ resisoc'h ivez war ar stourmoù politikel ha sevenadurel eo red studiañ pishoc'h doare ekonomikel ha kevredigezhel ar vro hag an enkadennoù m'ema an dud enne.

Setu 'ta war betra-holl eo dao diazezañ ar stourm evid ar brezhoneg ha peseurt ster reiñ de'añ ha n'eo ket mont da durlutad gant n'oun doare pe vroadelouriezh.

Ivon Gag.

(Pennad echuet e miz Du 74)

Notennoù : (7 ha 8).

(7) Kresk zo pe zo bet gant luskad ar re yaouank e vont war-zug o bro, war-zug Breizh, bremañ pa ne oa ket bet gwechall. N'eus mui gant ar brezhoneg ar memes plas er gevredigezh. D'ar re yaouank teu 'ta skiant deus ar brezhoneg en un doare disheñvel-tre diouzh d'ar remziadoù kent. Disheñvel 'ta en em renont dirakañ (ha se vije dao marteze a-walc'h studiañ pishoc'h) Kreñvoc'h eo ive al luskad bremañ evid gwechall abalamour d'an enkadenn m'ema enni ar gapitalouriezh. En ur gevredigezh ma teu diasur hec'h isframmou, a c'hoarvez kemmoù en hec'h usframmou, gizioù preder nevez vez e sevel, pa vez aezetoc'h dezho diwanañ. Setu unan eus an abegoù m'eo en em ledet kalz "giz ar brezhoneg" er bloavezhioù diwezhañ. Med a-feur ma teuy anatoch eme ar gapitalouriezh war he zalarou, a-feur ma voc'h krog gant an emgann, en em droyo muioc'h-mui 'n dud war-zug ur stourm hollakoc'h. (ha setu pezh zo c'hoarvezet un tamm bennaket er bloavezhioù diwezhañ en Emsav).

(8) Marteze dre ar stourm-se a zreistpado un dra bennaket vo tu ober dioutañ "Pobl Vreizh", med n'eo ket er gudenn da zont se 'ni' ema an dalc'h evid ar poent, er c'hudennou a hiziv ne lavaran ket.

NOTENNOU DIWAR-BENN ISTAR BREIZH

=====

Gant J. CHARDRONNET.

Ganet eo ar bobl o chom e Breizh armorig eus meur a ouen kemmesket. Anavezet fall eo ar c'hentañ pobloù o deus bet aze marteze 100 000 vloaz 'zo. Marteze hepken ! ... Eus pe lec'h e teuent ? An niver anezho ? Piv e oa ar pobloù-all o deus savet ar vein-veur etre 1200 ha 4500 a.K. ? N'anavezomp tra diwar o gouenn, o buhez, h.a. Deuet eo pobloù keltieg war-dro 600 a.K. . Marteze niverusoc'h, med mann ebet ne ro da grediñ e voe distrujet rig ar pobloù kozh gant ar pobloù nevez.

Mestr e voe ar Romaned abaoe 52 a.K. betek 476 g.K. Med ne boblint ket ar vro. Diaes eo anavezoud stad an Arvorig pa zeraouas dilestradeg ar Vretoned eus enez Breizh.

Perag an divroadur-se ? Lavaret ataw e tec'hent dirak ar Saozon oc'h aloubiñ plaenioù Reter an Enez. Emichañs ez eo gwir evid ar wech kentañ. Med an divroadur-se a badas war-dro 150 vloaz. Krediñ a reomp e voe meur a abeg-all : ur vro nevez pinvidikoc'h, re a dud en enez... Ne deuent ket digempen, med rediet gant o renerien, menec'h pe get. Ha buan e teujont da ren war ar vro nevez, o viroud oc'h anw, o yezh ; buan-tre e teuas o yezh da vezañ yezh ar vro. Hag o weloud pegen fetis eo an anwioù breizheg a-hed aod an hanter-noz, ha zoken en Argoad, ez omp douget da grediñ ne oa ket niverus poblañs an Arvorig. Marteze, e chom er C'hanada muioc'h a anwioù-lec'h indianeg eget anwioù galianeg pe roman e Breizh-Izel. Ar pobloù nevez ne ro-ont a anwioù nevez nemed pa ne gavont anw all ebet. Klav-tre ha zoken marv e oa ar sevenadur galianeg dre Vro-C'hall a-bezh, mouget gant ar sevenadur romaneg ; ma chom ur sevenadur keltieg e Breizh-Izel hepken ez eo anad ez eo ur sevenadur deuet eus Keltia tra-Mor.

+++++

Ar Breizh nevez-se ? Pevar varead en he istor :

- 1) Amzer-diazezañ : Bretoned er vro, met disunvaniet : 450-845.
- 2) Ur vro unvan ha dieub =ar Vretoned mestr en o zi : 845-1532
- 3) Un emrenerezh bennak e-pad 250 vloaz : 1532-1789.
- 4) Lonket eo Breizh gant Bro-C'hall : abaoe 1789 n'hell ar Vretoned lavaroud netra.

Ne chom ket dilusk istor ar pobloù. Kemm a ra an harzoù, ar reolioù-stad. N'eo buhez ur bobl nemed ur stourm evid bevañ, stourm en diabarz etre ar re a gav mad an traoù hag ar re a fell dezho o freuzañ ; stourm en diavaez d'en em zifenn a-eneb ar re all.

An dra vad pe an dra fall a zeu ivez eus an douaronezh (da skouer, ez eo red gouzoud ez eo Iwerzhon un enezenn evid kompren hec'h emgann), eus aergelc'h ur marevezh (red eo d'ar Bortugaliz dilezel o zrevadennoù hiziv en abeg d'an aergelc'h etrevroadel). Med kemmadurioù e vuhez ar pobloù a zeu dreist-holl eus bolontez an den, bezañs ur penn, ur spered-dreist. Graet en deus Nevenoe unvaniezh Vreizh. Hebtañ moarvad ne vefe ket bet klevet komz outi, ken boaz ma oa an dierned vreizhad d'en em gannañ, ken dontma 'z eo sanket e spered ar Vretoned an ezomm d'en em zisrannañ. Goude marw ar roue Salaün, ec'h adkrogas an emgann diabarzh. Evel just, liesaad a reas argadoù an Normaned. Ne voent dizarbennet nemed pa zeuas ur penngadour gwir, Alan Vras e 888, ha diwezhatoc'h Alan Barveg da seveniñ adarre an unvaniezh e Breizh. Un dra vad, afer un den ! Un dra a zo heverk : beli an Duged a zo diazezet dreist-holl war berzhioù mad an den.

Ar rummadoù breizhad (a Roazhon, Naoned, Gwened pe Gernew a zo bet diaes-tre dezho miroud un unvaniezh bennag : n'o deus ket miret ar yezh e Breizh-Uhel. Neuze hag e vefent Norman (evel Jaffrez pe Arzhur) pe Gapecian (evel Pèr Dreux), n'eus forzh ! N'en deus ket c'hoariet Jaffrez evid mad an Normandi ; n'en deus ket graet Per Dreux c'hoari ar Roue. Klasket o deus o mad dezho o-unan, ha dre-se mad o dugelezh, mad Breizh. Evel-se e vrezelias Per Dreux a-eneb Loeiz IX ; ha dibab a reas Yann IV bezañ skoazellet gant Roue Bro-Saoz a-eneb Roue F Frañs. Memes tra a reas an duged-all hervez an darvoudoù hag hervez o youl : dezho e veze da varn, diouzh stad an traoù pe-tra oa mad ar vro ; ha gwazh a se evid Breizh ma veze fall o dibab ! Aes eo, pemp kant vloaz goude, kondaoniñ an Dug Fransez II ; med penaos e teuas da reiñ fiziañs d'ar Roue Loeiz XI ? Hini pe hini a lavaro e oa didec'hus, e oa hervez ster an Istor, e kouezhfe Breizh e krabanoù Bro-C'hall : gwelit an douaroniezh, gwelit mad ar Rouantelezh. Mar d'eo gwir se, pell 'zo e vefe bet kouezhet ivez Bro Velgia hag ar Palatinat e dalc'h Bro-C'hall : Ar vro-C'hall evel e amzer ar C'halianed. N'eus tra didec'hus ebet en istor.

Ma voe trec'het Breizh, ma voe trec'het ar Vretoned, e Sant-Albin an Hiliberenn, ez eo en abeg da Varoned Uhel Breizh, traïtourien d'o bro. Hag, a-hend-all, an holl gonnetabled-se, Dugesklin, Klison, Richemont, gouestlet da servij ar Roue, o deus labouret da greñvaad ar rouantelezh c'hall, ha dre-se c'hoariet a-eneb Breizh. Zoken, goude an drec'hidigezh, ar varoned uhel, dre warizi, gant ar c'hoant da vihanaat beli an dugez Anna ha da vezañ mestr, d'o zro, war an dugelezh, o deus en em werzhet d'ar roue ha gwerzhet o bro. Ma vefe bet un Nevenoe nevez e 1480 e vefe bet kemmet istor Breizh.

1532 : an drec'hidigezh ! Diw eured Anna Vreizh, rediet pe redietoc'h, n'o deus ket lakaet aesoc'h an traoù evid Breizh, daoust ma voe paret un tammig marteze ar freuzoù ga-

net eus dismantr an armoù. Evit gwir, e oa boazet renerien Vreizh da vezañ mevelienn Bro-C'hall e gouarnamant ar vro. N'o deus ket avad ankounac'haet pep tra ; rag, da amzer diktat 1532, o deus pouezhet evid saveteiñ ar gwirioù (an tailhoù h.a.) . Med, abaoe 1515, ez eo ar Roue a zalc'h stur Breizh. Piv a c'hellfe sevel ur stourm er vro(gant ar spi d'ober berzh.?).

Adalek neuze n'oar ken ar Vretoned penaos saveteiñ o ene vreizhad. Beuzet int en ur dolzenn vras, hag un tammig digalonekaet. Meur a wech e voe torret diviz pe ziviz eus feur 1532 gant ar Roue. Ar bobl ne lavaras tra : ne zeu ket mab ar roue da Roazhon evid bezañ kurunet ; meur a ezel eus ar Parlamant, meur a eskob n'int ket brezhon : den ne lavar tra. Zoken, n'eo ket abalamour ma n'eo ket bet bodet breujoù Breizh ez eo en em savet ar Bonedoù Ruz med kentoc'h en abeg d'an tailh nevez a oa bet lakaet warno. Ar brouenn : memes emsavadenn e Bourdel h.a..

Pontkalleg ? Ne voe ket heuliet an dudjentil gant ar bobl. -La Chalotais? un emsavadenn a dud dreistgwiriet, emsavadenn goudoret, kuzhet a-dreñv gwirioù Breizh. Hag, evel-se en em stlejet Breizh betek noz a 4 a viz eost 1789, ma voe skrapet he gwirioù : kannaded an Trede urzh breizhad o deus damasantet : an dudjentil o deus savet klemm, heb bezañ bet selacuet. Ne zeu an emsavadenn nemed gant La Rouerie, damdost re ziwezhat. Hag, e stourm ar Chouannerezh e vez kavet abegoù relijiel, abegoù roueel kement hag abegoù vreizheg, ken pouezhus e voe ar menoz breizhad gant ar Chouanted.

Adalek neuze, ez eo echu evid Breizh ar stourm politikel. N'hell ket Breizh bevañ nemet el lennegezh hag en arz : n'eo ket avad memes tra eviti. Pa vezo diskolpet Liger Atlantel diouzh Breizh e 1972 evid sevel rannvroioù nevez ez eo diaes lavaroud ma voe kreñv an enebadegoù : anat eo al labour dismantr graet gant 450 vloaz a stagidigezh.

Scuezhus eo na fiñvas ket ar Vretoned er c'hantved añvet "kantved ar Broadelezhioù", un amzer ma voe gounezet o frankiz gant kement a bobloù Europa. Ne voe azgoulennet tramañ-tra nemed war-dro 1918 (e-pad ha goude ar brezel), hag e 1927 un emrenerezh bennag evid Breizh. Gant an emsaverien a WENN HA DU ha goude ar re eus an FLB (bihan med talvoudus o niver), eo lakaet anat n'he deus ket kollet pobl Vreizh menoz ar Gwir d'en em ren hec'h unan.

=====

BROAD HAG ISTAR

+++++

Bernez Rous.

N'heller ket sevel skridoù diwar-benn an istor heb ma vefe liw un ideologiezh bennag warno.) à vez savet ul levr diwar-benn istor Bro-C'hall e vez dalc'het peurliesañ (tost dalc'hmad) d'an ideologiezh vroadel, da vojenn ar stad-vroad. War ar stad eo diazezet keal ar vroad gant ar C'hallaoued. Ur benveg eo neuze an Istor da zisplegañ penaos e vije deuet ar stad a-benn da genglo-tañ gant ar vroad, anad ez eus bet deus outi a-viskoazh.

Pa bleder gant Istor Breizh, dre vras e c'heller rannañ -evid ar pezh a sell ouzh ar vroad- an istorourien etre daou rummad :

-ar re a zegemer ez eo aet Breizh d'ober lod eus ar vroad c'hall.
-ar re a ra eus Bro-Vreizh ur vroad diforc'h oc'h enebañ ouzh ar vroad c'hall.

Ar re gentañ (Delumeau, da skouer) a bouez war ar pezh a dosta Breizh ouzh Bro-C'hall. Ar re all (La Borderie, Chardronnet, Skol Vreizh) 'vez roet lod ar pardon gante da zifennourien frankizoù an Arvorig, ha da vare ar roueed hag an duged a vije oad aour hor bro, hor sevenadur. Med daoust ha roiñ a ra istor Breizh diazezoù a-walc'h d'ur seurt ideologiezh vroadel ? Daoust ha levezon an istorourien c'hall ne vez ket anad war ar mod da soñjal en istor Vreizh ? Dre vras e vez kavet an heveleb ideologiezh e-barzh levrioù istor Bro-C'hall ha re istor Bro-Vreizh.

ooo oooooooooo ooo

Dibar eo Bro-C'hall a-dreuz ar bed-holl : enni sañset e "klot mad ar stad hag ar vroad" (A. Hauriou. Droit constitutionnel). Da dermeniñ hounnezh e vez graet dave alies da bozioù Renan, an Tregeriad meur : "N'eo ket komz an heveleb yezh na bezañ eus an heveleb gouenn tud a ra ur vroad, med bezañ graet a-gevred traoù meur er mareoù tremenet, ha kaoud d'ober c'hoazh an amzer da zont". Setu perag e vez graet kement a forzh eus an istor e Bro-C'hall. Ganet eo ar skol istorel c'hall da vare Renan, an hini brudetañ eus he c'helennerien o vezañ bet Michelet, ha dibaoe e talc'h dalc'hmad d'an heveleb ideologiezh vroadelour. Brudañ a ra al levrioù skol "traoù meur" an dremenad adaleg Vercingetorix beteg Napoleon Gozh. Forzh pegement e vez roet brud, er skinwel, er filmoù, d'an "traoù meur" a zo bet bevet gant ar rummadoù a-vremañ : ar brezel pevarzeg, ar resistañs... Kelennadurezh an Istor e-barzh ar skolioù an hini he deus graet ar muiañ, e gwirionez, da skignañ mojenn ar vroad c'hall e-touez ar bobl.

Er skolioù meur e vez pouezet muioc'h war emdroadur an armerzh, ar gevredigezh hag ar frammoù politikel. Daoust da se, ne vez komzet dalc'hmad nemed eus broioù 'zo : Bro-C'hall, Bro-Saoz, Bro Alamagn, Bro Italia... Zoken pa ne oa ket deus outo, da vare ar Grennamzer da skouer. Biken ne vez dalc'het kont eus saviad politikel gwirion ur mare, el levrioù gall ne vez komzet eus BREIZH nemed goude m'eo bet staget ouzh rouantelezh Bro-C'hall. En un doare sutil koulskoude e vez lakaet ar speredoù da zegemer ez eus bet a-viskoazh eus Bro-C'hall c'hwec'hkogneg.

Setu amañ ur pennad-digeriñ da "histoire de la Civilisation Française" gant Duby ha Mandrou, daou istorour brudet e Vro-c'hall :

"Ne c'heller ket ober dave d'ur sevenadur gall araog diwez an degved kantved. Beteg ar mare-se ez ae ar rannvroioù gall d'ober lod eus broioù brasoc'h, rouantelezh ar Franked, Bro-C'hallia pe impalaouriezh Charlez Veur. Adaleg ar bloavezhioù mil ez a o fersonelezh war resisaad ; doareoù ar vuhez pemdeiz, doareoù soñjal ha lavar a ya war zisheñvelaad. N'int nemed arouezioù dister ha diaes da verzoud sur a-walc'h, med ragdiazegoù ur gevredigezh a sevenadur int, hag abalamour d'an dra-se e kaver reizh klask mont da heul hec'h Istor.

War beseurt dachenn ? Sed aze ur gudenn nevez a vevennadur, a zibab. Rag ma klasker -e-giz ma seblantfe bezañ reizh- ober gant menoz ar Frañs e-giz ma oa anezhañ e-barzh pennoù tud an degved kantved, ne gaver nemed diresister. Bro Frañs a zo da gentañ penn bro ar maezioù hag ar c'hoadoù en em led etre ar Ster Marn hag ar ster Oaz, etre Pariz ha Sañliz. SKridoù an amzer-se a rae Bro Frañs eus an dukelezh a yae un nebeud rannvroioù e norz ar ster Liger d'ober anezhi. Ur vro bevennet gant an Normandi, al Loren hag ar Bourgogn. Med ne oa ket c'hoazh ar rouantelezh bevennet gant ar peder ster (Escaut, Meuse, Saone, Rhone) a oa bet termenet gant feur-emglew Verdun e 843.

Nikun eus an douaroù-se na glote gant tachenn ar gevredigezh c'hallek. Hounnezh e gwirionez a zo bet krouet tamm ha tamm oc'h en em astenn war zuoù liesseurt ha distabil pe tro-dro kreizennoù 'zo. Termeniñ lec'h, bevennoù hag astennadur ar gevredigezh c'hall a glaskimp ober en istor-mañ. Hag o vezañ ma zo da bal an imbourc'hadenn-mañ war an dremenad kompren gwelloc'h an amzer a-vremañ, ne vo kaoz ganti nemed eus an holl rannvroioù a ya d'ober Bro-C'hall hiziv an deis".

Sklaer eo an displegadenn : pa n'eus ket c'hoazh eus Bro-C'hall c'hwec'hkogneg, ez eus memestra an egin anezhi. Gwasoc'h c'hoazh, lakaet 'vez da dalvezoud ar Frañs c'hwec'hkogneg a-vremañ a-hed ar c'hantvedoù tremenet ; e-giz-se 'vez sanket don e pennoù ar vugale ez eo ar Frañs un dra reizh, un dra naturel.

Dave 'vez graet da feur-emglew Verdun e 843 a vije o roiñ un diazez reizh da Vro-C'hall. Med ne oa ket ar Vretoned da skouer dindan beli Charlez Veur ; Bro Roazhon ha Pro Naoned enne Gallaoued a oa e-barzh an Impalaouriezh. Kalz talvoudusoc'h e c'hellfe bezañ arguzenn ar sevenadur galleg.

Siwazh pa vez komzet eus sevenadur er grennamzer eo hini ar gloer 'vez kaoz dioutañ : ar sevenadur gouizieg. Ha setu diazezet ar sevenadur gall war ar manatioù. A-boan ma vez meneget ar sevenadur lig (an droubadourien). Meneget e vez un oberenn bennag e "trefoedach ar werin" galleg Normandi.

E gwirionez n'eus kaoz nemed eus sevenadur gouizieg gant ar C'hallaoued. Er Grennamzer e oa ar ouiziegezh er manatioù nemetken, ha latin a gomze ar gloer. Ar framm nemetañ etre an lXvet hag an Xlllvet kantved a oa an iliz. Aet e oa ar galloud lig gwan tre ha n'eus nemed en Xlllvet kantved ez eus deuet melestradurezhioù ha stadoù.

Ar velestradurezh a oa red d'an noblañs evid koñtrolliñ ur renkad nevez a oa o sevel en Xlvet-Xllvet-Xlllvet kantved. Ur yenn e oa ar vourc'hizelezh e-barzh eteo ar gevredigezh c'hlad-dalc'hel, diazezet ma oa anezhi war armerzh al labour-douar. Ar c'henwerzh an hini eo en deus lakaet pinvidigezhioù ar vourc'hizien da greskiñ, pa goazhe re an noblañs. Tamm ha tamm e teuas neuze ar rouantelezhioù, an dukelezhioù d'en em frammañ. Arouezius eo eo bet dibabet 1350 evel bloavezhiaed deroù ar Stad Vrezhon gant "Skol Vreizh" ha n'eo ket 845.

Pa veze Nevenoe o trec'hiñ war ar C'hallaoued, ne oa ket Breizh oa o trec'hiñ med ar Vretoned ; ken koulz ha Gallaoued oa tud Roazhon pe Witreg. Ha setu enñ da gemer titl Roue Breizh, med petra oa Breizh d'ar mare-se ?

Hiziw e vez lakaet pemp departamant d'ober Breizh. Kement-se zo anad d'an holl, d'an holl emsaverien d'an nebeutañ. Pa vez lakaet en arvar an "anadenn istorel"-se gant krouidigezh ar rannvroioù ofisiel ez eus kevredigezhioù e-giz B5 pe strolladoù, kazi an holl strolladoù politikel ha sevenadurel breizhad evid adkemer al lugan : Naoned e Breizh. Koulskoude e oar a-walc'h ar re zo bet o tastum rezin e Bro Naoned e lar al loariz-Atlantel a zo o chom en tu all d'ar ster ez int Naonediz, ha n'eo ket Breizhiz. Reizh a-walc'h eo o emzalc'h 'benn ar fin pa seller ouzh istor Breizh.

Deuet e oa Bretoned tramor a-benn da drevadenniñ al lodenn vrasañ eus ledenez Arvorig, e kornog al linenn anavezet mad o vont deus Menez Mikael Ar Mor da Sant Nazer. Nevenoe, kreñvaet e c'halloud gant diskar impalaouriezh Charlez Veur, a zeuas a-benn da alcubiñ Bro Roazhon ha Bro Gastellbriant beteg ar Ster Liger. Erispoe an hini eo a astennas e veli war vro Rezh ha Klison ; e rouantelezh a yae neuze beteg Cherbourg ha Angers. N'eo nemed da vare Alan Veur (888-908) eo bet kadarnaet da vad Breizh en he "ment istorel" (Skol Vreizh). Krouet eo bet Breizh a-ziwar impalaouriezh Roueed ar Vretoned.

Ur fed istorel eo Breizh ha netra ken. Diw bobl zo enni : ar C'hallaoued hag ar Vretoned. Tud 'zo a lar e vije bet brezhonekaet ar C'hallaoued e-giz e bro Wennrann ma ne vefe ket deuet ar Romaned. Pôsubl eo med ar c'hontrol 'ni zo c'hoarvezet, ha dao deomp ober gant ar pezh a zo.

Ken kreñv e oa pouez ar vro C'hallaoued en Dukelezh m'he deus lakaet ar yezh vrezhoneg da gilañ beteg Sant Brieg. An Dug e-unan, da lavaroud eo ar Priñs galloudusañ e Breizh, zo deuet da vezañ galleger buan a-walc'h (Hoel Kernew o vezañ bet, hervez,

an hini diwezhañ oc'h ober gant ar brezhoneg). An hini a oa perc'henn war Vro Naoned ha Bro Roazhon a oa Dug. Dre-se eo bet lakaet ar brezhoneg, yezh al lodenn baourañ eus ar vro, da eilrenk. Adal neuze e c'heller en em c'houlenñ hag interestoù ar Vretoned pe interestoù an noblañs a zifenne an Duged dirag Roue Bro-c'hall pe hini Bro Saoz.

War-lerc'h Mauclerc (Brizhkloareg), anad e tifenne an Dug e wirioù e-giz Priñs a Vro C'hall ha n'eo ket e-giz Dug ur Vreizh dieub. Mauclerc an hini eo en deus degaset ar frammoù politikel gall e Breizh, frammoù oa ezhomm d'an noblañs evid mont a-eneb d'ar vourc'hizien.

Levezon vras o deus bet ar vourc'hizien e Breizh, rag gallet o deus en em ziorren d'ar mare-se kalz muioc'h evid e Bro-C'hall, e-lec'h ma lakae ar Brezel-100-vloaz e reuz. Gwelet e vez lod eus an noblañs oc'h en em lakaad e-barzh ar c'henwerzh : Goetanlem e Montroulez, Rohan, De Guebriant. Enebiezh vras a oa koulskoude etre an noblañs uhel hag ar vourc'hizien, enebiezh en abeg d'o interestoù disheñvel.

A-du e oa ar vourc'hizien gant miroud he frammoù politikel da Vreizh. Tud e-giz Pierre Landais, bet teñzorer an Dug, a oa a-eneb taer da Vro-C'hall. Pa vleunie ar c'henwerzh e Breizh; n'helle ket ar vourc'hizien mont a-du gant ur vro hanter ziskaret. An noblañsoù er c'hontrol a oa perc'henn war zouaroù e Bro-C'hall, e lec'h ma ne oa ket ken kreñv ar vourc'hizelezh. Lakaad Breizh stag eus Bro-C'hall a oa gwanaad ar vourc'hizien dre ar memes tro. Setu perag n'heller ket ober eus feur-emglew 1532 disoc'h un emgann kollet nemetken, un dibab a-berzh an uhelidi an hini eo.

E 1789 eo ar c'hontrol an hini zo bet : an Noblañs o tifenn Breizh, da lavaroud eo frammoù gladdalc'hel e-keid ma oa ar vourc'hizien a-du evid dilezel an nebeud gwirioù politikel a oa gant Breizh d'ar mare-se. A-bell zo eo bet stag interestoù bourc'hizien Vreizh ouzh re bourc'hizien Bro-C'hall, ar seurt bourc'hizien a zo o c'hoari hiziv war dachenn Europa (ar rannvroelerezh europad a zolod eus an emzalc'h-se).

N'eus ket a stad vrezhon bremañ, n'eus ket kennebeud a rannvro Vreizh, dezhi ur galloud bennag. Ne glot ket 4 departamant ar rannvro ofisiel gant "boudelezh istorel" Breizh evid adimplijoù pozioù Skol Vreizh. Ha setu ma kaver tud o laroud ez eus ur vroad pe egin ur vroad e Breizh.

Tu vefe da lavaroud ez eus diw ouenn tud, diw yezh, daou sevenadur en hor bro. Ne dalvfe ket ar boan neuze stagañ anezhe gant liammoù stad. Koulskoude en em lar an holl anezhe Bretoned koulz ar re gante ur sevenadur galleg hag ar re gante ur sevenadur brezhoneg. Eskemmoù e-leizh zo bet etre Breizh Uhel ha Breizh Izel, dreist-holl el lodenn a zo bet brezhonekaet gwechall e chom roudoù eus ar sevenadur brezhoneg. En tu all da Roazhon ervad, eo nul pe dost levezon sevenadur Breizh Izel. N'eus ket a ziforc'h armerzhel pe gevredigezhel etre tud ar Felger ha tud Sant Hiler an Harzkoed. Perag elar ar re gentañ ez int Bretoned neuze ?

N'heller displegañ ar fed kevredigezhel-se dre ma 'zeus bet ur stad e Vreizh. Hiziw e lar an darn vrasañ deus ar Vretoned ez int Gallaoued abalamour d'ar stad c'hall a zo bet trec'h. War vervel ez a menoz Breizh e-touez ar Vretoned, a eil-renk eo. An dud a lar int Gallaoued da gentañ, Bretoned war-lerc'h. Ar stad a-benn ar fin eo an hini a grou ar vroadelezh. An holl vroioù minorezhel enno "broadelourien" a zo bet stadoù gwechall. Setu perag e fell d'ar vroadelourien kaoud ur stad a adgroufe ar perzhioù broadelezh 'zo vont da get hiziw.

Sklaer eo evid Breizh. Ur vro e-giz Oksitania ha n'eo ket bet unvanet morse en ur stad a chom gwan-tre enni an emskiant anezhi hec'h-unan. N'eus ket tamm diazez istorel d'an oksitanelezh, ha setu perag ez eo ar yezh an diazez anezhi. Anad n'helle ket ar stad, da lavaroud eo ur grouadenn artifisiel roiñ abeg d'ur stourm, d'an nebeutañ e Breizh. Stourm e-ser adkrouiñ ar stad Vrezhon gant he "ment istorel", dre zigarez ez eus bet deus-outi, a zo en em ziazezañ war impalaouriezh hon henroueed.

N'eo ket ar stad vrezhon a ziskoulmo kudennoù hor bro frozh penaos. Tu zo da hiraeziñ d'ar mareoù kent pa 'z ae bagoù ar Vretoned da gas holen pe win da seiz korn Europa, pa oa un Dug hag ur ragparlamanterezh e Breizh. Kement-se ne vire ket ouzh ar Vretoned da vont d'an harlu, zoken er Grennamzer, ne vire ket ouzh hor yezh da gilañ dirag ar galleg. Ma vije Breizh chomet ar baourez kaezh anezhi. E Manaw zo ur gouarnamant, ur parlamant ; hag aet eo da get ar manaveg. En Iwerzhon, memestra, pe dost. N'hellont ober netra rag n'eo ket gouest ur gouarnamant kapitalour da herzel ouzh ar gapitalouriezh da lazhañ ur yezh, abalamour n'ema e-barzh logig ar sistem. N'eo ket ar skinwellpe ar skingomz vrezhoneg a savetey hor yezh, nag an oferenoù brezhoneg ; lezenn ar C'hapital an hini eo, a zo o lazhañ hor yezh, hor buhez kevredigezhel, stourm outi zo red da gentañ.

Perag emamp o stourm gant hag evid ar brezhoneg neuze ? 'Benn ar fin n'hell hor stourm nemed daleañ maro hor yezh. Ma vez dispennet ar Capitalouriezh araog ma vo aet ar brezhoneg da get e c'hellimp kemer perzh en adsao ar sevenadur brezhoneg. Morse ne varvo ar yezh eveljust, kavet e vo atao mil den evid komanantiñ da Al Liamm, en o zouez 50 skrivagner, hag e vo ur vuhez vrezhoneg, ur sevenadurig brezhoneg distag-krenn diouzh ar bobl. Ma tigouezh da Vreizh-Izel dont da vezañ e-giz Roazhon, gant tri pe pevar ziegezh brezhoneger beuzet e gourlenn ar galleg, e vo echu gant ar sevenadurezh pobl brezhoneg.

oooooooooooooooooooo

A BELEC'H E TEU AR MENOZIOU REIZH.

.....

(Mae 1963)

Mao-Se-Dong.

A belec'h e teu ar menozioù reizh ? Ha kouezhañ a reont eus an neñv ? Ne reont ket. Hag enganet int ? N'int ket. Ne c'hellont dont nemet diwar ar pleustrerezh kevredigezhel, diwar tri rumm a bleustrerezh kevredigezhel : ar stourm kenderc'hañ, ar stourm etre renkadoù hag an arnodadur skiantel.

Diouzh e vuhez kevredigezhel e teu e venozioù d'an den. Ar menozioù reizh, ha nep renkad en a-raok a zo e verk dezhañ bezañ reizh e venozioù, kerkent ha ma z'eo erru ar yoc'hoù intret gante, a deu da vezañ un nerzh dañvezel gouest da dreuzneuziañ ar gevredigezh hag ar bed.

Dre ar stourmoù a-bep seurt emañ o ren er gevredigezh e teu d'an den ur skiant-prenet puilh a denn ken diwar e daolioù mat ha ken diwar e c'hwitadennoù.

Anadennoù diniver ar bed ergorel a vez adskedet e empenn an den dre bemp benvegenn ar skiantoù, benvegennoù ar gweled, ar c'hleved, ar c'hwesa, an tañva hag ar stekiñ ; evel-se e teu dezhañ e verzanaoudegezh. Pa vez dastumet trawalc'h a verzaadennoù ar seurt-se e c'hoarvez ul lamm o c'hemm e anaoudegezh poellek, da lavared eo e menozioù. Un argerzh d'an anaoudegezh eo, kentañ derez argerzh hollek an anaoudegezh derez an tremen eus an danvez, hag a zo ergorel, d'ar spered, hag a zo dangorel.

D'an derez-se, n'eo ket anat c'hoazh eo adskedet difazi lezennoù ar bed ergorel gant ar spered pe ar poellad (da lavared eo gant an damkaniezhoù, ar politikerezh, ar raktresoù, an doareoù-ober raktreset). N'eus ket tu c'hoazh da c'houzout ha reizh int, pe n'int ket.

Warlerc'h e teu eil derez argerzh an anaoudegezh, derez an tremen eus ar spered d'an danvez, eus ar preder d'ar boud. Dav eo neuze pleustriñ war dachenn ar gevredigezh diouzh un anaoudegezhioù deut dimp e-kerz an derez kentañ, evit gweled hag-eñ ra berzh an damkaniezhoù, ar politikerezh, ar raktresoù hag an doareoù-ober raktreset. Peurliesañ e vez reizh ar pezh a ra berzh, e vez faos ar pezh na ra ket ; gwir eo dreist-holl e-keñver stourm an dud ouzh an natur. Er stourm kevredigezhel e c'hoarvez a-wechoù droukverzhioù gant nerzhioù ar renkad en a-raok oc'h en-em-gannañ, n'eo ket abalamour d'o menozioù faos, abalamour ne vezont ket ken kreñv ha nerzhioù kilstourmel ne lavaran ket. Met a-benn ar fin e teu bepred ar maout gante,

goude droukverzhioù an deroù.

Oc'h ober gant e anaoudegezh hel lak an den da vont war-raok ha d'ober ul lamm all, hag a zo kalz pouezusoc'h evit an hini a-raok.

Rak gant al lamm-se nemetañ e c'heller prizañ talvoudegezh an hini kentañ, da lavared eo gouzout hep mar ha reizh pe faos eo ar menozioù, an damkaniezhoù, ar politikerezh, ar raktresoù, an doareoù-ober, hag all ... , empentet e-korf argerzh preder war ar bed ergorel ; mod-all, n'eus ket tu da gavout ar wirionez.

Hogen, klask anavezout ar bed evit e gemm a ra ar werin, n'eus pal all ebet ganti.

A-benn disoc'h war un anaoudegezh reizh e vez ret alies adober meur a wech an argerzh tremen eus an danvez d'ar spered hag eus ar spered d'an danvez goude, da lavared eo eus ar pleustrerezh d'an anaoudegezh, hag eus an anaoudegezh d'ar pleustrerezh goude.

Setu damkaniezh varksat an anaoudegezh, damkaniezh danvezel daelerel an anaoudegezh.

An damkaniezh-se, avat, n'eo ket bet komprenet mat gant meur a-hini e-touez hon c'hamaladed. Pa vez goulennet digante eus pelec'h e teu o menozioù, o c'hredennoù, o folitike-rezh, o doareoù, o raktresoù, o c'hlozadurioù, eus pelec'h e teu o frezegennoù diziwezh hag o fennadoù hir, e kav dezhe eo iskis ar goulenn ha ne ouzont ket petra respont. N'int ket kenbeut evit kompren al lammoù ma tro dreze an danvez e spered hag ar spered e danvez, anadennoù boutin ar vuhez pemdeziek anezhe koulskoude. Abalamour da se eo ret kelenn d'hon c'hamaladed damkaniezh danvezel daelerel an anaoudegezh, evite da c'houzout en-en-zibab gant o menozioù, ober enklaskoù hag imbourc'hadennoù ha barn o skiant-prenet, evite da c'hellout trec'hiñ war an diaezamantoù, klask pa vez tu chom hep ober fazioù, ober mat o labour, harpañ ar muiañ ma c'hellont da sevel ur vro sokialour galloudus hag a-benn ar fin skoazellañ yoc'hoù gwasket ha korvoet ar bed, e sell da seveniñ an dlead uhel a zegouezh ganeomp.

Laorañs Guillaumie.

.....

Embannadurioù SKOL AN EMSAV

=====

= Kentelioù Eil Derez gant Frañsez Favereau 15 lur

Ul levr roneotet a 160 pajennad a zo bet e bal deskiñ hag elfennoù kentañ hon lennegezh da skolidi etre 13 ha 15 vloaz (live ar pevare klas er skolioù gall).

= Diwar-benn ar sevenadur 4 lur

Kavet e vez el levrig-se a 70 pajennad ur rummad pennadoù a-ziwar ar sevenadur gant a beb seurt tud : F. Kerrain, I. Gag, M. Noguti, Y.E. Broudig, F. Elegoed, Y. Olier, F. Favereau, H. Latimier.

= Kompren hol lennegezh
Sens de la littérature bretonne 2 lur

Embannet eo bet al levrig diwezh-se dreist-holl evid ar re a zo o teskiñ brezhoneg, evid roiñ dezhe un istor berr eus hon lennegezh.

= Reolennoù an doare-skrivañ nevez gant Lukian Kergoad 1,50 lur

Tenaos un trede pe ur pevare skritur ? a-raog barnañ e rank peb hini kaoud un anaoudegezh sufis eus diazezoù an doare-skrivañ nevez SS -S -Z -ZH.

Degemeret eo bet an doare-skrivañ-se gant an UDB ha gant Ar Falz. Kavoud a reer ivez ul levr kelenn en doare-se, hini Fañch Morvannou "Le Breton Sans Peine".

==!!==!!==!!==!!==!!==!!

GOULENNIT AL LEVRIOU-SE DIGANT

Dominig Bourges
Porzh an Ifern
Bourk KOADOUT
22200 GWENCAMP